


KANAOUENNOU

JEAN DERRIEN



**Kanaouennou**

Jean Derrien

# Kanaouennou

Emgleo Breiz

Embannet gand skoazell  
Rannvro Breiz

Trugarekaad a reom  
Soazig Noblet  
eo bet savet an notennou muzik ganti  
René Abjean  
e-neus eil-skrivet anezo war e urziataer  
ha Gwendal Le Bras,  
evid o sikour.

Embannet gand Emgleo Breiz, 10 ru Kemper, 29200 Brest  
Moulet gand Jouve, 11 bd Sébastopol, 75001 Paris  
Disklêriet hervez al lezenn : Trede trimiziad 2007  
Maketenni ha golo : Annabelle Rougier  
Foto Jean Derrien : Sozig Noblet-Laouenan  
© Jean Derrien hag Emgleo Breiz  
N° I.S.B.N. : 978-2-911210-69-7

## Jean Derrien, ar paotr seder

Ma zo eur haner a zo bet dalhet soñj deuz e vouez ha deuz e ganaouennou e bro-Dreger eh eo a-dra-zur Jean Derrien. Adaleg ar bloaveziou 60 ha 70 eo bet unan euz brudeta kanerien Strollad Beilladegou Treger.

Ganet eo bet an den d'an 30 a viz even 1920 e Plouber. D'an oad a 5 bloaz, e oa bet eet da jom da Vulian. Beteg an oad a 14 vloaz eo bet er skol e Sant Jozef Lanuon. Goude, e-noa lakeet e ano en eur skol dre lizer, hag e-pad daou vloaz all e tapas deskadurez c'hoaz "evel ar re vraz".

Labourad a ree e ti e dud, a oa labourerien-douar. Labour ar hoad a blijje dezañ avad, sed e oa eet war ar vicher amunuzer, war e gont e-unan da genta. Eun devez e oa bet goullet gantañ ober archedou hag archedi ar re varo a ree ive, beteg mond da labourad evid ar "*Pompes Funèbres*" a-benn eun toullad bloaveziou. Se ne vire tamm ebed deuz outañ da veza eur paotr seder. Etrétant, eur wech dimezet e 1948, e oa bet eet da jom da Louaneg, stok deuz ar mor, e Nantouar.

Jean Derrien a blijje kalz ar muzik dezañ. Sed e-noa desket son gand an akordeoñs, an hini "diatoneg" evid komañs, hag an hini "kromateg" diwezatoñ : re ger e oa ar henteliou evitañ, sed e-noa desket e-unan ! Asamblez gand eun tabouliner, e h ee neuze da zon er baliou eured, toniou ha kanaouennou deuz ar hiz, evel just.

Pa oa bet savet "Strollad Beilladegou Treger", e-noa Roger Laouenan goulennet digantañ mond da heul, e 1959. Sed en em gavas er strollad, asamblez gand Maria Prat, Fañch Danno hag eur vandennad vad a ganerien all hag a gome-dianed, evid ober tro bro-Dreger beb sadorn, e-kerz ar goañv. D'ar houlz-ze e tirede berniou ha berniou tud d'ar beilladegou. Kovajou c'hoarzin a reent beb sadorn da noz. Ha strakal o daouarn pa glevent Jean Derrien o tistaga e ganaouennoù : "pa h erruen-me war al leur, emezañ, e cheñche ar zal".

Da genta, e sone hag e kane traou anavezet. Med dond a reas da veza skuiz o kana bepred ar memez kanaouennoù. Sed petra 'reas, nemed en em lakad da zevel reou nevez, da gana anê, en galleg (evel "*Le chant des FTP de Nantouar*") koulz hag en brezoneg. Berz a reas, ken e reas. Sod e oa Tregeriz gand e ganaouennoù, pe e raje goap, pe e raje fent, pe 'vije karantez pe 'vije teneridigez, ha pa veze o kana meuleudi d'e vro. Deuet e oa kanaouennoù Jean Derrien da veza reou tud ar vro. Ma vije bet eun *top 40* d'ar houlz-ze e bro-Dreger, sur e vije bet Jean Derrien er penn a-raog e-pad eur pennad mad. En em gaoud a ree an dud er pezh a gane.

An traou a blije ar muia dezañ kana a oa ar mor hag ar var-toloded, e damm kornad douar. Lakad a reas ive en brezoneg eun toullad kanaouennoù galleg deuz ar hiz d'ar houlz-ze. Eun ugent bennag e-noa savet en oll. Med derhel a reas da gana reou goz, soniou-pobl, ha zoken hiniennou bet skrivet gand tud evel Anjela Duval ("*Benoni*"...) pe Youenn Gwernig ("*Tap da zah, breur koz*"...). Setu perag eo bet renket al leor-mañ en diou lodenn : ar hanaouennoù e-neus skrivet eñ e-unan, hag ar re all a blije dezañ kana ive. Ema bepred Jean Derrien o chom e Nantouar, en parrouz

Louaneg, e zellou troet war-du ar mor. Eüruz eo bremañ pa glev reou yaouank o kana e ganaouennoù : laouenidigez a deu diwarne, ha neket melkoni.

## Brezoneg Treger

Liou brezoneg Treger a zo, evel just, war yez Jean Derrien. Adskrivet eo bet e ganaouennoù hervez reolennoù an doare-skriva a-vremañ. Aliez a-walh, koulskoude, on-eus dalhet d'ar stumm Treger. Sed amañ eun toullad anê :

*Mom* : on-no

*Moam* : on-oa

*Nim* : ni

*Arri* : erru

*Arriet* : erruet

*Keun* : keuz

*O'r* : ober

*Parrouz* : parrez

*Benitiouer* : piñsin dour benniget.

Eun toullad gerioù all :

*Kafar* ha *pinar* a zo diwar ar galleg, evel m'eo anad. Heñvel evid ar *hordegardou*.

Taveeg eo an enezenn a vez greet *Tome* anezi war ar hartennoù.

*Penn ar Vale* a zo ar beg er hreisteiz da Daveeg, 'leh ma veze pesketet kalz a ormel.

*Mond da vale ar gourlenn* : mond da glask traou war vord ar mor just goude ar gourlenn.

E-barz ar ganaouenn Jean-Mari, e ranker kompren ar werzenn *An han han bremañ* evel eur seurt rimadell pe ribour-tadenn, ha netra ken.

## I

### Ar hanaouennoù e-neus savet Jean Derrien

## Ar marh bihan gwenn

Ma 'peus c'hoantkle- ved kan-a se- tu eur ga- na- ouenn  
a zo greet an dei- ziou -mañ d'eur mar- hig bi- han gwenn  
'n eus ko- man-sete vu- hez e me- naj Kêr- A- vel e- ki- chen  
gêr ne- vez war dou- ar Breiz- I- zel

Ma 'peus c'hoant klevet kana,  
Setu eur ganaouenn  
A zo greet en deiziou-mañ  
D'eur marhig bihan gwenn  
'Neus komañset e vuhez  
E menaj Kêr Avel.  
E-kichenn ar gêr nevez,  
War douar Breiz-Izel.

Ar marh bihan zo ganet  
Eun deiz e kraou ar zaout,  
En-dro pevar dañvad  
Diou vuoh-léz hag eur maout  
E vestr n'eo ket pinvidig.  
Aliez e vez kov moan.  
Hag evel-se ar marhig  
A zo chomet bihan.

Roet 'oa dezañ neuze  
Eur vourel, eur hulier,  
Eun tamm akipaj nevez  
Da deski e vicher.  
Staget war an dumporell  
Pe war ar host' all, eñ,  
Pa ra glao, pa vez avel  
A zikoure e vestr.

Tapoud 'ree korveennou  
Koulz ha labouriou skañv.  
Evid sikour e vestr  
E ree euz e wella.  
Plijoud a ree d'ar vugale.  
Arri mad gand ar re goz,  
E garr bihan a charree  
Euz ar beure da noz.

E vestr a veule anezañ  
Er parreziou war-dro.  
Eur marh bihan eveltañ  
Ne oa ket 'barz ar vro.  
Pe vez d'ober charreou  
Pe labourad douar,  
Da drenia an oustillou,

Ne gave ket e bar.  
Med eun deiz zo arriet  
E vestr a zo maro  
Gwall-gaset gand ar hleñved  
Falhet gand an ankou.  
Neuze e oa bet gwerzet  
Ar marhig bihan gwenn.  
Pa 'ma e vestr er vered  
'Neus ranket cheñch perhenn.

Gwerzet 'oa an aneval  
Da Job ar miliner.  
Bremañ 'h aio da borteal  
Da vilin ar Goskêr.  
Bemdeiz ar pezh a gare  
E-nije kerh ha foenn.  
Evuruz e oa adarre  
Ar marhig bihan gwenn.

Mond da gerhad gwiniz  
Da di ar menajer,  
Ha goude eñ war e giz  
Da gas ar bleud d'ar gêr.  
Pa 'h ee a-hed ar parkou  
Pe dre an hentou don  
Da charread e gargou  
Lakee toud e galon.

Med brevet gand ar gozni  
'Oa ket kap da vond ken.  
'Oa manet er marchosi  
E-pad ar goañv yen,  
Hag e oa manet kousket  
War ar plouz, e wele.

Biskoaz n'eo bet dihunet,  
 Ar marh bihan abaoe.  
 Kanaouenn ar marh bihan  
 A zo heñvel ivez  
 Demeuz hini an azen  
 E chañson Hugues Aufray.  
 Memez tra 'vel an azen  
 « *Le petit âne gris* »  
 Eo marvet ar marh bihan  
 E traoñ ar marchosi.

## Kastell Toñkedeg



Kas- tell koz Ton- ke- deg! gwe- chall, pa oan me bu-  
 gel me deu- e da re- deg war da vo- ge-riou u- hel  
 Gand pô- tred vi- han all me hoa- ri- e gwe- chall  
 euz a beu- re - d'an noz en- dro d'ar has- tell koz.

Kastell koz Toñkedeg  
 Gwechall pa oan-me bugel  
 Me deue da redeg  
 War da vogeriou uhel  
 Gand paotred vihan all  
 Me c'hoarie gwechall  
 Euz ar beure da noz  
 En-dro d'ar hastell koz.

Euz lein an dourell vraz  
'Plije din gweled ar vro  
Ha karoud a reen c'hoaz,  
Er gwez kistin, er gwez fao,  
Kleved, pa deue an hañv  
An evned o kana  
Oll o kana din-me  
Soniou a garantez.

Pa deu miz gwengolo  
Amañ 'vez greet ar pardon.  
'Kichenn an tourellou  
'Klever ar muzik o son  
Hag ar baotred yaouank  
Ha gand o dousig koant  
D'ar hastell da vale  
D'ar zul goude kreisteiz.

Deiz pardon Sant-Weltaz  
Me 'zo bet gand ma mestrez  
Deuz an abardaez-noz  
O vale er hastell koz.  
Ha touet he-devoa  
E vije din fidel  
Keit ma chomfe 'n o zao  
Touriou koz ar hastell.

Hag aliez abaoe  
Me 'zo bet o vale  
E-kichenn ar hastell  
O hortoz ma dimezell.  
E traoñ an dourell vraz  
Me 'hortoze. Siwaz,  
Ma zurzunell a zo

Nijet er-mêz ar vro.  
Eur wech c'hoaz 'vid an noz  
Me 'zo deuet adarre  
Beteg ar hastell koz  
Evid ober eur bale.  
An touriou zo chomet  
Heñvel evel gwechall,  
Med ma dous a zo eet,  
Pell a zo, gand eun all.

Miz even 1964

## Pesketaer ar Yeoded

'Vel toud ar var-to-lo-ded 'm-eus ba-le-et er bed  
Ar bro-iou tomm 'm-eus gwe-let hag ar bro-iou skor-net  
Gwe-let 'm-eus n'eur ve-a-ji bro-iou kaer ha dis-par Med  
eur vro all 'vel ma hi-ni n'eus ket war an dou-ar  
Me 'zo deus ar Ye-o-det 'tal ar cha-pel du-hont  
e bro ar var-to-lo-ded e beg ri-nier Lan-nu-on

'Vel toud ar vartoloded  
'M-eus baleet er bed.  
Ar broiou tomm 'm-eus gwelet  
Hag ar broiou skornet.

Gwelet 'm-eus 'n eur veaji  
Broiou kaer ha dispar.  
Med eur vro all 'vel ma hini,  
N'eus ket war an douar.  
Me zo deuz ar Yeoded  
E-tal ar chapel du-hont,  
E bro ar vartoloded  
E beg riñvier Lanuon.

Pa oan arri braz 'vel-se  
'Vel toud ar grennarded  
'Vijen en aod 'hed an deiz  
O c'hoari gand bigornied.  
Ha diwezatoh goude  
Ne gaven ket divalo  
Mond d'an aod kazi bemdeiz  
Gand paotred ar bagou  
Mond da lakaad kevell  
Pe da lakaad rouejou,  
Pe da voueta eun andell  
Da dapoud siliou.

Du-hont e beg ar riñvier  
Bemdeiz 'mesk ar pesked  
Me a gave berr an amzer.  
Gand ar vartoloded  
Bet on aliez er-mêz  
O pesketa brizilli.  
Hag a-geñver d'al Leo Drêz,  
Hennez o chaludi  
Pesketaerien ar Yeoded  
Ne 'z ajont ket 'n o gwele  
Pa vez c'hoant da gaoud pesked  
'Ver abred deuz ar beure.

Pa vo arri koz ar paotr  
Arri fall war ma diouharr  
Ne ven kap ken da vond d'an aod  
Red vo chom tost d'ar gêr.  
Neuze c'hoaz war doull ma dor  
Du-hont 'barz ar Yeoded  
E leh ma welin ar mor  
'N eur fumi ma hornedad,  
Me a zoñjo aliez  
En amzer dremenet  
E plije din mond war an trêz  
Da glask kontelleged.


Hag eun deiz 'arrio ma zro  
'Vo red mad partia  
Ha paka ma zamm rouejou  
Da guitaad ar bed-mañ.  
Med 'raog mond kuit deuz ma bro  
Da bartia du-hont  
Me a laro kenavo  
Da riñvier Lanuon.  
Hag o pignad war greh  
Du-ze mesk ar stered,  
'Rin eur zell etrezeg Ploureh  
Ha 'trezeg ar Yeoded.

Med peogwir er baradoz  
N'am-eus netra d'ober,  
Deuz ar beure beteg noz  
Me 'gavo hir an amzer.  
Da Zant-Per me a laro :  
« Digorit din an nor,  
Me rank mond d'ober eun tamm tro  
Du-hont war vord ar mor.

Roit din eur bouteg  
Ha neuze eur rastell  
Me 'h a da vond d'ar Yeoded  
Da dibab rigadell. »

01 a viz du 1959

## Son ar pesketaer



Eun de-vez ma zad-koz a la-re din-me; Se-laou ma fôtr!  
'Vel da du-dou-koz te a-raio i-vez eur mar-to-lod.  
Eur mar-to-lod? O ya, eur mar-to-lod!

Ma zad-koz eun devez a lare din-me  
Selaou ma faotr :  
'Vel da dudou-koz, te a raio ivez  
Eur martolod  
Eur martolod  
O ! ya ! eur martolod.

Sentet am-eus gwella am-eus bet gallet  
Euz ma zad-koz  
Eet on ivez war ar mor da luskellad.  
Ha deiz ha noz  
Ha deiz ha noz  
O ! ya ! ha deiz ha noz.

Ar goañv 'vez kriz ha kaled a-wechou  
D'ar pesketaer  
Pa vez er-mêz pell du-ze gand ar bagou.  
Fall an amzer  
Fall an amzer  
O ! ya ! fall an amzer.

Meur a besketaer dre vag e-neus laret  
Sent ouz da stur !  
Ma 'zentez ket ouz ar varrenn, d'ar garreg  
Te 'h aio sur  
Te 'h aio sur  
O ! ya ! te 'h aio sur.

An amzer vad arrio 'vid an deziou,  
Ha me 'h aio  
Pelloh er-mêz bemdeiz da gas ma rouejou  
Pesked a vo  
Pesked a vo  
O ! ya ! pesked a vo.

Evel-se 'm-eus tremenet ma zamm buhez  
Bemdeiz en aod.  
Redeg ar mor euz an eil penn d'egile  
Eo bet ma lod  
Eo bet ma lod  
O ! ya ! eo bet ma lod.

Diwezatoh pa vin-me krog da skuiza  
O torna dour  
Em zi bihan me dremeno c'hoaz amañ  
Deveziou flour  
Deveziou flour  
O ! ya ! deveziou flour.

Hag eun devez e teuio karrig an ankou  
'Vid ma herhed  
Evid ma has du-hont gand ar re varo  
Korn ar vered  
Korn ar vered  
O ! ya ! korn ar vered

Deuz e vouez rust eñ din-me a lavaro  
Red eo mond kuit  
Ken droug all dezañ me a responto  
N'in ket ganit  
N'in ket ganit  
Me nann n'in ket ganit

War vord ar mor me a fell din chom amañ  
Leh ma klevin  
Mouez ar morverhed noz ha deiz o kana  
O kana din  
O kana din  
O ! ya ! o kana din

18 a viz du 1961

## Eur pok kenta

A Daou zen ya-ouank 'vel an oll ya-ouan-kiz-zou war vord ar mor eun de-  
B Eur pok ken- ta bet ro- et mesk ar ger- reg a zo cho- met tomm war

vez o va- le daou zen Ya-ouank o deus grêt pro- me- se- ou  
o mu- zel- lou Si- waz ar vu- hez zo leun a boan- spered

'ti- me- jent an eil d'e- gi- le, 'ti- me- jent an eil d'e- gi- le.  
e- vid an oll ya- ouan- ki- zou, e- vid an oll ya- ouan- ki- zou!

Daou zen yaouank 'vel an oll yaouankizou  
War vord ar mor eun devez o vale  
Daou zen yaouank o-deus greet promesaou  
'Timezjent an eil d'egile. (2 wech)  
Eur pok kenta bet roet mesk ar herreg  
A zo chomet tomm war o muzellou.  
Siwaz ar vuhez zo leun a boan-spered  
Evid an oll yaouankizou. (2 wech)

Marivonig eun deiz a zo partiet,  
Kuitaet he-deus he zi 'kichenn an aod.  
Da gostez Pariz eo eet da labourad  
Ankouaet he-deus he martolod. (2 wech)

Eur pok kenta bet roet 'mesk ar herreg  
 Zo tremenet 'vel 'tremen ar bleuniou.  
 Siwaz, ar vuhez zo leun a boan-spered  
 Evid an oll yaouankizou. (2 wech)

Yannig abaoe an deiz-se zo glaharet.  
 Pelloh 'h aio bemdeiz da besketa,  
 N'helo biken ankouaad e vuia-karet  
 He-deus dilezet anezañ. (2 wech)  
 Eur pok kenta bet roet 'mesk ar herreg  
 A zo chomet tomm war e vuzellou.  
 Ha kredi 'ree dezañ eun devez gweled  
 Marivonig o tond en-dro. (2 wech)

War vord ar mor du-hont en e vatimant,  
 A zo bepred eur martolod yaouank,  
 Ha n'e-neus ket cheñchet c'hoaz a zantimant.  
 Gortoz a raio e vestrez koant. (2 wech)  
 Eur pok kenta bet roet 'mesk ar herreg  
 N'eo biskoaz yenet war e vuzellou.  
 Ha kredi 'ra dezañ eun devez gweled  
 Marivonig o tond en-dro.

Marivonig eun deiz zo deuet war he hiz,  
 Distroet eo david bro he havell.  
 Skuizet eo bet gand buhez trouzuz Pariz.  
 Deuet eo en-dro da Vreiz-Izel. (2 wech)  
 Eur pok kenta bet roet 'mesk ar herreg,  
 N'en-do biskoaz yenet war he dioujod  
 'Vid an deizioù a zono kleier eured  
 Da Varivonig, d'he martolod. (2 wech)

18 a viz du 1961

## Son parrouz Louaneg

Kan

Me oa di-lo-jet da vond da Lou-an eg 'n toul-lad bla-ve-ziou 'zo

Heb kon-tan ge-vier, a-ze 'n em bli-jer. 'N dis-tro-in ket en-dro

Barz en nan-tou-ar 'mañ ma zer-rou-ar, a-ze vent c'hoa-ri ma faotr

e bra-va kar-tier 'zo e Lou-an-eg, du-hont e kos-tez 'n aod

Diskan

Kan-om toud a-sam-blez ha pa-ra-fem tro ar bed

'n ga-fem ket diou bar-rouz 'vel par-rouz Lou-an-eg!

Me 'oa dilojet  
 Da vond da Louaneg  
 Eun toullad bloaveziou zo.  
 Heb konta gevier  
 Aze 'n em blijer,  
 Distroin ket ken en-dro.

'Barz an Nantouar  
'Ma ma zerouar  
Aze 'ven o c'hoari ma faotr  
E brava kartier zo e Louaneg  
Du-hont e kostez 'n aod.

*Kanom asamblez  
Ha pa rafem tro ar bed  
'Gavfem ket diou barrouz  
'Vel parrouz Louaneg.*

Bet om aliez  
E Mabiliez  
Devez ar pardon braz.  
Gwelet 'meum eno  
'Vije gourenou.  
Ha gweled 'refom c'hoaz.  
Kaer 'po galoupad.  
Nann ne gavfeh ket  
E kêr na war ar mêz  
Eur pardon kaer 'vel e Louaneg  
Pardon Mabiliez.

*Kanom oll asamblez  
Ni 'h aio 'vid an deiziou  
Toud da Vabiliez  
Da weled gourenou.*

Na 'peus ket klevet  
Devez an tantad  
An driweh a viz mae  
Moueziou parrouzianiz Louaneg  
O sevel war-zu an neñv  
O kana enor

Da zant Erwan  
Patron euz on farrouz  
'Vel ma ree pa oant barz ar bed-mañ  
Gwechall on zadou-koz.

*Kanom oll asamblez  
Enoriou ha meuleudi  
Da batrom on farrouz  
Sant Erwan Elouri*

Klevet 'peus ivez  
Komz marteze  
Deuz gad vraz ar Goskêr  
'Deus arri lakaad  
Da haloupad  
'Oar den ped chaseer.  
Bet eo bet tapet  
Kaji bet lahet  
A beb eil gante toud  
Hirie beure 'oa sioul o peuri  
E park ar Gerizoud.

*Kanom oll asamblez  
Red mad 'vo tenna ervad  
Pa zigoro ar chase  
'H efom da glask ar had.*

Piou 'neus ket gwelet  
Piou 'neus ket klevet  
Komz euz Louaneg-sport  
'Welom ordinal  
War ar journal  
En eur plas a enor  
Kaer 'vo lared

Ne vo ket kavet  
'Barz ar parrouziou all  
Paotred yaouank 'vel e Louaneg  
Da vond da c'hoari football.

*Kanom oll asamblez  
Mad 'h a an traou memestra  
Louaneg-sport zo bepred  
E-barz ar penn kenta.*

A-raog echui  
E komzin deoh-c'hwi  
C'hoaz euz an Aotrou Mêr  
Sur e-neus poaniet  
'Benn 'n-eus degaset  
An dour dim toud d'ar gêr.  
Med 'gomprenan ket  
'Neus ket bet soñjet,  
Koulskoude eo eur paotr fin,  
E-leh lakaad dour dim en duellenn,  
Ma 'nije lakaet gwin !

*Kanom oll asamblez  
Ha ne 'mom ket a gafar  
Dour 'meum bet da genta  
Diwezatoh 'mom pinar.*

Ar ganaouenn-mañ  
Zo bet kompozet  
Eun devez d'abardaez  
Pa oam o tistrei  
Deuz Taveeg  
Eur pesketaer all ha me.  
'Benn kenta mare

'H efom adarre  
Ma vez eun tamm amzer vad  
Da ormela da Benn ar Vale  
Leiz beb a baner goad.

*Kanom oll asamblez  
Ha pa rafem tro an douar  
Nann parrouz Louaneg  
Ne gavo ket he far.*

## Erru eo ar vartoloded

*Kan*

Pa oan kan- fard bi- han du- hont 'barz e Lo- ke- mo me

*Diskan*

vi- je 'pad an deiz o sel- led deus an aod. Er- ru eo ar var- to- lo- ded

er- - ru eo pao- tred ar ba- gou er- ru eo pao- tred ar pes- ked

er- - ru eo pao- tred Lo- ke- mo E- barz an aod e vent toud

o la- bou- - rad Deus ma vez tre be- teg ma vez lan- o Er- ru eo ar

var- to- lo- ded Er- - ru eo pao- tred Lo- ke- mo!

*Var. Kan*

Pa oan kan- fard bi- han du- hont 'barz e Lo- ke- mo me

vi- je 'pad an deiz o sel- led deus an aod.

The musical score is written in a single system with ten staves. It begins with a treble clef, a key signature of two flats (B-flat and E-flat), and a 4/4 time signature. The melody is primarily composed of eighth and quarter notes, with some rests. There are several triplet markings (indicated by a '3' over a bracket) under the notes for 'er-ru' and 'o sel-led'. The lyrics are in Breton and are aligned with the notes. The score includes a main key (Kan), a double key (Diskan), and a variation (Var. Kan). The lyrics are: Pa oan kan- fard bi- han du- hont 'barz e Lo- ke- mo me; vi- je 'pad an deiz o sel- led deus an aod. Er- ru eo ar var- to- lo- ded; er- - ru eo pao- tred ar ba- gou er- ru eo pao- tred ar pes- ked; er- - ru eo pao- tred Lo- ke- mo E- barz an aod e vent toud; o la- bou- - rad Deus ma vez tre be- teg ma vez lan- o Er- ru eo ar; var- to- lo- ded Er- - ru eo pao- tred Lo- ke- mo!; Pa oan kan- fard bi- han du- hont 'barz e Lo- ke- mo me; vi- je 'pad an deiz o sel- led deus an aod.

Pa oan kanfard bihan  
Du-hont barz e Lokemo  
Me 'vije 'pad an deiz  
O selled deuz an aod

'N em zao war benn ar hae  
Ma daou dorn em godellou  
O soñjal daoust hag-eñ  
'H ajen da vartolod

Ha pa droe em fenn  
Eh een ivez a-wechou  
Da vale er gourlen  
War-lerh an amzer fall

Diarhen hag em fenn noaz  
Hanter difoñs ma bragou  
A-hed an aocheier  
Me 'h ee da beñseal

Ma brasa plijadur  
'Vije pa 'mije gallet  
Tapoud barrenn ar stur  
War batimant ma zad

Da gas ar vag er-mêz  
Da besketa sardined  
Me 'vije evuruz  
Aze en em gaven mad.

Ha da heul ar mare  
A 'h eem da gas ar rouejou  
Ha 'chomem 'pad an deiz  
Aliez 'pad an noz

Ha pa vije tapet  
Pesked e-leiz ar bagou  
Me a gane neuze  
Eur zon d'ar baotred koz

*Diskan*

*Erru eo ar vartoloded  
Erru eo paotred ar bagou  
Erru paotred ar pesked  
Erru eo paotred Lokemo  
E-barz an aod e vent toud o labourad  
Deuz ma vez tre breteg ma vez lano  
Erru eo ar vartoloded  
Erru eo paotred Lokemo*

'Benn ha 'm-oa pemzeg vloaz  
'Plije din mond d'an dañsou  
Ar vals hag ar polka  
'Deue mad ganin-me

D'ar zul goude kreisteiz  
Me a 'h ee d'ar pardonjou  
Gand ma hamaradou  
Plijadur a vije

Adaleg ma klevent,  
Me paotr e akordeoñs,  
Me a ranke kenkent  
Mond da heul ar zon

Ha koanta plah yaouank  
A vije e Lokemo  
'H een-me da gas d'ar gêr  
En devez ar pardon

En eur vond dre an hent  
'Ruillet ket en toufleziou  
O nann sur evelkent  
Ne reem netra a fall.

Memestra koulskoude  
En troiou-korn en heñchou  
'Tape ganin rei de'i  
Eur pok gwech ha gwech all.

Bremañ on dimezet  
Ha kavet am-eus unan  
Da zikour ahanon  
Da dresa ma rouejou.

A-raog mond da gousked  
Deuz an noz goude on hoan  
Ni 'gan on-daou neuze  
Son paotred Lokemo.

#### *Diskan*

*Erru eo ar vartoloded*  
*Erru eo paotred ar bagou*  
*Erru paotred ar pesked*  
*Erru eo paotred Lokemo*  
*E-barz an aod e vent toud o labourad*  
*Deuz ma vez tre breteg ma vez lano*  
*Erru eo ar vartoloded*  
*Erru eo paotred Lokemo*

02 a viz meurzh 1963

## Ar wezenn avalou



Ma ha- lon 'zo gla- ha- ret, rag e- vid an dei- ziu, an  
a- vel neus dis- ka- ret va gwe- zenn a- va- lou, Ya,  
'n- a- vel braz o c'hwe- zañ neus, en deiz all da noz, kuil-  
let ar we- zenn gaer- ran oa du- mañ 'barz ar hloz.

Ma halon zo glaharet  
Rag evid an deiziou  
An avel 'n-eus diskaret  
Ma gwezenn avalou  
An avel vraz o c'hweza  
'Neus an deiz all da noz  
Ruillet ar wezenn gaerra  
'Oa du-mañ barz ar hloz

D'ar wezenn a zo kouezet  
Me am-eus kalz a geun  
Pegen kaer 'oa da weled  
Pa vije en he bleuñv  
Kement hini 'dremene  
'N he hichenn d'ar houlz-se  
Gand kalz a joa salude  
An danvez chistr nevez

Fañch ma amezeg nesa  
'Neus eur gorzailenn zeh  
Hag arriet 'oa du-mañ  
N'eus ket pelloh 'vid deh  
Pa 'neus gwelet ar wezenn  
Astennet 'n he gourvez  
'Neus bet Fañch eur falladenn  
Ken eo kouezet ivez

Ar buanna m'am-eus gallet  
Me a zo eet neuze  
Da gerhad eur voutaillad  
Euz ma jistr warlene  
Ha daoust pegen glaharet  
E oa Fañch memestra  
Pa 'n-eus gwelet chistr bouchet  
Eo savet en e zav

Ha toud ma hamaradou  
Gwasa ma plije dez(o)  
Dond da o'r eur barti hartou  
D'ar zul goude kreisteiz  
Bep parti vije evet  
Eur voutaillad chistr koz  
Ober 'reem beb a dortad  
A-benn ma vije noz

An hini goz deuz du-mañ  
'Blije ket dezi an dud vezo.  
Koulskoude pa wel bremañ  
'C'hwito din ma banne traou  
He-deus eun tamm nehamant  
Pa wel penaoz 'benn bloaz  
N'e-no ket ar paour-kêz Yann  
Eur banne chistr da eva

Ha ma devezier gwella  
Ar mevel braz Batist  
Ne deuio ket ken du-mañ  
Ma ne vez ket a jistr  
Evid terri e zehed  
Pa vez stard al labour  
Jistr zo mad 'vid ar yehed  
N'houllo ket eva dour

Huñvreal 'ran a-wechou  
Pa vezan kousket en noz  
'Vezan o tibab avalou  
Dindan ar wezenn goz  
Ha goude pa zihunan  
P'n em gav ar beure  
Poan-spered 'mez pa welan  
Ma gwezenn 'n he gourvez

Kement-se zo gwall afer  
Hag ober ran gwad fall  
Med gwella tra 'm-eus d'ober  
Eo planta unan all  
Evel-se ma bugale  
O-devo memestra

Diwezatah adarre  
Jistr nevez da eva.

25 a viz du 1964

### Ar merhetaer

The musical score is written in a single system with five staves. The first staff is labeled 'Kan' and contains the melody. The lyrics are written below the notes. The second staff continues the melody. The third staff continues the melody. The fourth staff is labeled 'Diskan' and contains a triplet of notes. The fifth staff continues the melody and includes another triplet. The lyrics are: An deiz all e oa gou-len- net di-gan- in gand pemp pe c'hweh, pe tra 'zo kaoz n'out ket di-meet Se- tu 'han da gon- tan deoh. Kouls- kou- de 'h een da ver- he- ta 'vel ar bao- tred vi- han all, ha gou- de o- ber deuz ma gwel- la bep tro am- mi- je chañs fall! Med me ne ran ket kalz a van n'on ket eun den d'o- ber gwad fall Pa vez eun war bar- lenn he mamm 'vez i- vez meur a hi- ni all!

An deiz all e oa goulennet  
Diganin gand pemp pe c'hweh  
Petra zo kaoz n'out ket dimezet.  
Setu 'h an da gonta deoh  
Koulskoude 'h een da verheta  
'Vel ar baotred vihan all,  
Ha goude ober deuz ma gwella  
Beb tro am-mije chañs fall

### *Diskan*

*Med me ne ran ket kalz a van  
N'on ket eun den d'ober gwad fall  
Pa vez eun war barlenn he mamm  
'Vez ivez meur a hini all*

Kichenn du-mañ en ti nesa  
'Oa eur plah yaouank koant, eur bennherez  
Ha pa vije o vond da vesa  
Eh en em welem aliez.  
Med gand eur hrak aotrou, siwaz,  
Eo bet eet er-mêz ar vro  
Hag abaoe an deiz-se biskoaz  
N'am-eus bet euz he helou

Ha 'barz en kostez Lanuon  
On bet o weled Maria.  
Eun tammig oad 'oa etrezom,  
Med feiz, ze ne ree netra.  
Meur a nozvez, me a hortoze  
E traoñ menez Berlewenez.  
Med Maria 'n em ankaouae  
Da dirohal 'n he gwele.

Unan a blije din e Rospez  
'Oa he hano Ogustin.  
Dimezet 'vijen bet da honnez  
Paneve d'eur bannah gwin.  
Tapet 'm-oa bet eun tortad  
Deiz ar homis agrikol.  
Deuet 'oa bet a-benn da gleved  
Setu eet an traou da goll.  
Warlene en eur veilladeg  
'M-oa anavezet Rozali.

War honnez 'greden 'oan barreg.  
Komzet a oa deuz dim(ez)i.  
Eun teod fall zo bet arriet.  
N'(ouz)on ket penaoz eo bet kont,  
Pa oa kistion d'o(be)r an eured  
N'eo ket dalhet an traou da vond.

E pardon kastell Toñkedeg  
N'on ket o konta gevier,  
Arri 'ra ganin traou eveeg.  
Eet on da gas eun d'ar gêr  
Chomet 'oan da rei eur pok dezi  
E toull ar porz e-kreiz an noz,  
Ma oa distaget ar hi-bleiz  
War ma lerh gand ar paotr koz.

Me 'm-eus da gomañs ma menaj  
Diou vuoh-lêz hag eur wiz koz,  
Ha moh bihan 'zo da veza  
Me 'gred 'benn warhoaz da noz  
Ar Rozette hag ar hilloro  
A oa d'am zad-koz gwechall.  
'Laro pep hini ar seurt a garo,  
Se n'eo ket eur fortun fall.

Ma zo amañ eun bennaked  
Hag he-dije c'hoant dimezi  
N'eo ket diêz. 'Deus 'med lared,  
Me raio marhad ganti.  
Ma 'hallom ket 'n em gleved  
Ma ne deuom ket a-benn  
D'o(be)r eur marhad 'vel zo dleet  
'H ay pep hini gand e hent.

Ha me ne rin ket kalz a van  
N'on ket eun den d'ober gwad fall  
Pa vez unan war barlenn he mamm  
'Vez ivez meur a hini all.

Miz du 1963

## War vord ar mor

The musical score is written on three staves in a treble clef with a key signature of one flat (B-flat) and a 4/4 time signature. The melody is simple and rhythmic, with lyrics written below each staff.

Eun de- vez ke- menthe tre- men ma am- zer oan eet da va- le war vord  
ar mor braz Hag en eur gan- a me a h'ee di- bre- der  
ma zroad a oa skañv ya- ouank e oan c'hoaz

Eun devez kement ha tremen ma amzer  
'Oan eet da vale war vord ar mor braz  
Hag en eur gana me a h ee dibreder  
Ma zroad a oa skañv; yaouank e oan c'hoaz.

Arriet e oan e-kichenn eur plah yaouank,  
Eur plah yaouank koant 'vel zo en on bro.  
War vordig an aod 'oa eno heh-unan  
O selloud ouz ar mor o tond en-dro.

En he hichenn me 'zo azezet ivez  
War ar bili en-kichenn ar mor braz  
Evned gwenn ar mor 'uz deom a darnije  
Koantoh eviti 'm-oa gwelet biskoaz.

Ar mor a zave, krog 'oa d'ober lano  
Ha me a gane ma zoniou kaerra  
Daoust ha ma n'houezen ket c'hoaz heh ano.  
Plijet e oa din, gwisket e oa skañv

En eur degas deom c'hwez vad euz ar bezin  
Eur barr-avel a zo deuet da hweza  
A zizoloas dezi pennou he daoulin  
A gasas da nij he robenn ken skañv.

He sikouret 'm-eus d'en em holoï neuze.  
Med pa oa ma dorn war he daoulin noaz  
Eun draig bennag em halon a skoe  
Ne gomprenen ket, yaouank e oan c'hoaz.

En he hichenn me 'n em gave evuruz,  
Evurusoh evid 'n eur baradoz.  
N'am-oa ket klevet o son an añjeluz.  
Eet an heol da guz, pell 'oa 'oa noz.

Ma, ne skuizem ket an eil gand egile.  
Hep goud deom e tremene an amzer  
Med en on hichenn trouz ar mor a hroze.  
Ar merhed fur 'zo pell a zo er gêr.

Daoust ha pegen kaer a vefe eur pardon  
E rank echui, se a zo sur mad.  
Hag ar houlz ivez a oa deuet evidom.  
Poent eo mond d'ar gêr, red eo en em guitaad.

Lakaet he-doa he dorn en ma hini,  
Ha neuze he chod e-kichenn ma chod.  
Kenavo disul am-eus laret dezi,  
Da vordig an dour e-kichenn an aod.

Med a-greiz an noz ma-unan em gwele,  
'Teue din ar zoñj euz ma dimezell.  
Ha karoud a reen a-benn ar zul goude  
'Nije adarre c'hwezet an avel.

Me n'on ket eun den devod ha koulskoude,  
En noz-se me am-oa greet sin ar groaz.  
Greet am-oa eur bedenn d'an Aotrou Doue  
Ma lakaje avel da c'hweza c'hoaz.

09 a viz genver 1966

## Mari-Madalen

Kan



Pa oan paotr ya-ouank 'barz ar ger, pa oan paotr ya-ouank 'barz ar

Diskan



ger, me ne ga-ven ket hir an am-zer Ma-ri -Ma- de leine la de-



mi mon- daine, Ma- ri -Ma- de leine ton ti ton taine.

Pa oan paotr yaouank 'barz ar gèr  
Me ne gaven ket hir an amzer.

*Diskan*  
*Mari-Madeleine*  
*« La demi-mondaine »*  
*Mari-Madeleine*  
*Tonti tontaine*

Plijoud a ree din galouped,  
Ha neuze dañsal gand ar merhed.

Pa vije pardon Louaneg,  
Me a deue gand ma bisiklet.

Neuze 'h een da weled ar bal,  
Rag plijoud a ree din dañsal.

Aze 'm-oa kavet unan hroz,  
A 'oa deuz kostez bourk Perroz.

Heh ano a oa Mari-Madeleine.  
Eun tamm penn skañv plah « *sans gêne* ».

Hañval deuz eur polichinel,  
Butun ganti 'barz en he godell.

Ar « *poudre de riz* » war he bizaj  
Me a gomz deoh-c'hwi deuz eun imaj.

Ganti e oa eur robenn verr,  
Talonou uhel euz he boutou-ler.

Eur zigaretenn en he beg.  
Me a gomz deoh-c'hwi euz danvez eur wreg.

He bleo a oa frizet 'vel gloan maout.  
'Vije ket lavaret eur vesaerez saout.

Beza 'devoa eur gwall zellou,  
Ha kalz a ruz war he muzellou.

Pa 'h een-me da dañsal ganti,  
E kase ahanon en-dro evel eun dompi.

Pa vez kistion da valsi,  
Ne gavan hini ebed evelti.

Ha pa oa echu an dañsou,  
E pae din-me eun apero.

Neuze 'h eem d'an ostaleri,  
Da eva beb a *Vermouth-cassis*.

« *Rendez-vous* » lakaem neuze,  
Da vond d'an aod ar zul goude.

Homañ n'eo ket eur chañson gaer,  
Med greet evid tremen an amzer.

Etre Nantouar ha Taveeg,  
Pa groge ket ken ar pesked.

## Gavotenn Lanuon

*Ton savet gant Bernard Lasbleiz*

Me a oa bet an deiz all war va zroid o va le  
hag am boa gwe- led dan- sal eur ga- vo- tenn ne- vez.

Me a oa bet en deiz all  
War ma zroid o vale.  
Hag am-oa gwelet 'tañsal  
Eur gavotenn nevez.

Eur biniou hag eur vombard,  
Hag an akordeoñ.  
Se 'oa devez Meurz-al-Lard  
'Barz en kêr Lanuon.

Marivonig 'oa ganin,  
Deuz kostez Buzulzo.  
Hag he-devoa laret din :  
« Deom 'ta d'ober eun dro,

Lak da zorn en ma hini,  
Deom da heul ar vandenn »  
Hag am-oa desket ganti  
Dañsal ar gavotenn.

Setu neuze nim o vond  
Da heul Sant-Marlarjez.  
Treuzet moam Kêr-Lanuon  
D'an eil penn d'egile.

N'am-oa ket gwelet biskoaz  
Kement a jolori  
Maskou bihan, maskou braz,  
Joaüz ha dizoursi.

Pa oa fin ar gavotenn  
'Om neuze azezet  
Da debri peb a grampouenn  
Gand eur bannah chistr bouchet.

Evet a-moam goude-ze  
Beb a vannah chouchenn  
Ha setu nim adarre  
'Rei beh d'ar gavotenn.

Difoñset 'oa ma botou,  
Kollet ma hasketenn,  
Ha 'benn ma oa fin an dro  
E oen arru diarhen.

Plijadur 'vez memestra  
Oh ober Marlarje.  
Ha ma ven beo a-benn bloaz,  
Me 'h ay de'i adarre.

Sant Marlarje Lanuon  
'N-eus eur vuhez gwall-verr,  
D'ar zadorn 'h a war an tron,  
Beuzet 'vez d'ar merher.

Dizurziou 'n-eus greet er vro  
'Tre ma 'h eo bet amañ.  
Laket eo bet d'ar maro  
War bont Santez Anna.

## Ha deuit eta, ma dous

Ha deuit eta ma dous  
Deuit disul da graoña  
Me na n'in ket da chaseal  
Ha ni a yelo on-daou  
Dindan eur bodig kraoñ  
Evid lared dousig on doareou.

N'in ket kenderv Frañsez  
N'in ket disul da graoña  
Ar zul eh eer da batera  
Ha pa zono ar hloh  
Frañsez me hey kentoh  
Da bedi Doue 'vidoh.

Me ho heulio ma dous  
D'an oferenn vintin  
En ho kichenn war ma daoulin  
Me laro ma 'fedenn  
Ma dous en ho kichenn  
Ha pe badfe peder eur pe ouspenn.

D'an oferenn vintin  
Kerzit Frañsez, kerzit  
Rag evidon, me n'in ket  
Rag d'ar zul e vez red  
Mond d'an oferenn-bred  
Evid kleved ar prezeg benniget.

Me ho heulio ma dous  
Beteg ar gousperou  
Hag e kasfom tra-walh a draou  
Da garga ho tavañjer  
Ma dous e berr amzer  
Araog an noz e vefom on-daou er gêr.

Kolled a rit Frañsez  
Ho poan hag ho komzou  
Rag n'ez in biken da glask kraoñv  
Gand den yaouank ebed  
Ma ne ven dimezet  
Rak eur person e-neus hen difennet.

## Laret 'deus din

Da gichenn milin Gêryann  
Me h a da vale aliez  
Hag e kavan Marijan  
O vond da gas he zaout er mêz  
Laret 'm-eus dezi ma karje  
E chomfen da vesa ganti  
Ha h afem da glask kraoñ-kelvez  
Tra ma vo ar zaout o peuri.

### *Diskan*

*Laret 'deus din mond  
Da c'hwitellad war an dosenn  
Gortoz anezi gand em dorn  
Eur boked spern gwenn  
Dastumet 'm-eus fleur  
Ha dalhet 'm-eus da c'hwitellad  
Tremenet eo an eur  
Med n'eo biskoaz arriet  
Nay nay nay nay  
Me zo sod nay.*

D'ar feunteun a-dreg an ti  
E oa o vond da gerhad dour  
Ha me pa oan zod ganti  
Oan eet adarre d'he zikour  
Pa 'm-eus tapet ar helorn  
Evid degas an dour d'ar gêr  
'Deus lamet 'nezañ deuz ma dorn  
Ha laret din-me krak ha berr.

O tond d'ar gêr euz foar gouel Yann  
Am-eus laret dezi penaoz  
Penaoz e vijen kontant  
Ma chomfe ganin deiz ha noz  
Eom da di an aotrou person  
Ha da weled an aotrou mêr  
Med eun eur stumm difeson  
'Deus laret din 'n eur vond d'ar gêr.

20 a viz kerzu 1968

## Nevez-amzer

Setu achu ar goañv  
Me 'wel ar bokejou-hañv  
O vleunia e bord ar hleuñiou.  
*Tra la la leno*  
*la la la la la la*

Ar lapousedou bihan  
Hag an durzunell a gan  
War ar gwez e-kreiz ar hoajou.  
*Tra la la leno...*

C'hwez vad zo er spem gwenn  
Kaer eo ar bleuniou melen  
El lanneier hag er prajou.

Evnidegou Breiz-Izel  
A zigor o diouaskell  
Da nijal er-mêz an neziou.

Ha d'ar zul goude kreisteiz  
Du-hont e traoñ ar menez  
Ma a glev son ar biniou.

Hag an oll baotred yaouank  
Ya da glask o dousig koant  
Krog eo adarre ar pardonioù.

Me a raio gand ma dous  
Meur a dro war ar pous-pous  
Ken aliez ha ma karo.

'Vid an deiziou e gouel Yann  
War ar gazeg viz Even  
Eom adarre da ober eun dro.

Me a glev ive du-hont  
An akordeoñs o son  
Deom on-daou d'an dañsou.

Ar vuhez zo re verr  
Ne gollom ket on amzer  
Deom da skriva an embannou.

Du-hont war vord ar mor glaz  
E-kichenn al lanneg vraz  
Eun ti nevez ni a zavo.

E-leh ma welfom ar mor  
O hlebia douar arvor  
Evurusoh ni a gano.

17 a viz du 1960

## Jean-Mari

Din boñjour deoh Janedig  
Din boñjour deoh 'laran  
An han han bremañ  
Din boñjour deoh 'laran  
Peleh 'ta 'ma Jean-Mari  
Pa 'ma ket o tomma.  
An han han bremañ  
Peleh 'ta 'ma Jean-Mari  
Pa 'ma ket o tomma

Eet eo du-hont d'al liorz  
Da dañvousesad ed  
Me a gred  
Da dañvousesad ed  
Kaozeit dousig outañ  
'Vefet ket refuzet  
Me a gred  
Kaozeit dousig outañ  
'Vefet ket refuzet

Din boñjour deoh Jean-Mari  
Din boñjour deoh 'laran  
An han han bremañ  
Din boñjour deoh 'laran  
Koñje ho merh Janedig  
Da zimi 'houlennan.  
An han han bremañ

Koñje ho merh Janedig  
Da zimi 'houlenann

Ma merh a zo yaouank c'hoaz  
Evid kaoud eur gwaz  
Evid c'hoaz  
Evid kaoud eur gwaz  
Leuskit eun daou pe dri bloaz  
D'ober eun ebat c'hoaz  
Evid c'hoaz  
Leuskit eun daou pe dri bloaz  
D'ober eun ebat c'hoaz.

C'hwi ho-po keuz Jean-Mari  
O ve'a ma refuzet  
Me a gred  
O ve'a ma refuzet  
C'hwi 'teuio d'henn ofr din-me  
Med n'he hemerin ket  
Ne rin ket, n'am-mo ket  
C'hwi 'teuio d'henn ofr din-me  
Med n'he hemerin ket.

Sammit ho paz den yaouank  
Lakait ane'i war ho skoaz  
O ya da  
Lakait ane'i war ho skoaz  
'Po ket ma merh er bloaz-mañ  
Kennebeud all da vloaz  
O nann da, 'po ket da  
'Po ket ma merh er bloaz-mañ  
Kennebeud all da vloaz.

Med a-benn eizteiz goude  
Janed zo manet klañv  
An han han bremañ  
Janed zo manet klañv  
Ranka 'raio Jean-Mari  
Mond da ofr e verh de'añ.  
An hanhan bremañ  
Ranka 'raio Jean-Mari  
Mond da ofr e verh de'añ

Din boñjour deoh den yaouank  
Din boñjour deoh 'laran  
An han han bremañ  
Din boñjour deoh 'laran  
Abaoe ma oah bet du-mañ  
Janed zo manet klañv  
An han han bremañ  
Abaoe ma oah bet du-mañ  
Janed zo manet klañv

Laret 'm-oa deoh Jean-Mari  
Ha laret 'm-oa deoh abred  
Me a gred  
Laret 'm-oa deoh abred  
E teufeh d'ofr ane'i din-me  
Med n'he hemerjen ket  
Ne rin ket, n'am-mo ket  
E teufeh d'ofr ane'i din-me  
Med n'he hemerjen ket.

Sammit ho paz Jean-Mari  
Lakait ane'i war ho skoaz  
O ya da  
Lakait ane'i war ho skoaz

'Mo ket ho merh er bloaz-mañ  
Kennebeud all da vloaz  
O nann da, 'mo ket da  
'Mo ket ho merh er bloaz-mañ  
Kennebeud all da vloaz.

### Jañ-Mañ bleo hir

Ma mamm 'lare : Jañ-Mañ  
Poent eo troha da vleo  
War da benn a zo arri  
Eur pezh boujennad traou  
Me 'h aio ganit da di  
Ar perukenner  
'Vo trohet da vleo dit  
A-benn 'teui d'ar gêr  
O ye !

An deiz all 'moa bet eul  
Lizer digand De Gaulle  
A lare din Jañ-Mañ  
Te a zo eur paotr drol  
Da vleo zo kalz re hir  
Evelse n'out ket chik  
N'houlan ket a vleo keit-se  
Barz ar Republik  
O ye !

Abaoe pell a amzer  
Pa 'h eer barz an arme  
Ar bleo 'vez trohet berr  
Te 'oar kenkoulz ha me  
Me am-eus respontet  
Neuze da Charlez Vraz  
Ma bleo ma ve'int trohet

Ar re-ze advounto c'hoaz  
O ye !

Me zo bet nevez 'zo  
Gand ma hamarad Lom  
Barz en Pleuveur-Bodou  
O weled ar Radom  
Eun dra gaer zo aze  
Rag bremañ me a wel  
Imajou an tele  
Deuz toud ar broiou pell  
O ye !

E Louaneg 'm-eus gwelet  
Andre Verchuren  
Ma bleo goude 'oant hir  
'Zave reud war ma 'fenn  
O kleved anezañ  
Gand e akordeoñs  
Hennez 'deuio du-mañ  
Pa vo greet ar pardon  
O ye !

Tapet am-oa gwelet  
An deiz all 'ti Jozon  
'Oa Jacqueline Huet  
Barz an television  
Laret 'devoa penaoz  
E vije amzer vrao.  
An deiz-ze 'benn 'oa noz  
E oa krog d'ober glao  
O ye !

Pa astenn an nozvezioù

E-barz en Bro-Dreger  
'Vez beilladegou  
Da dremen an amzer  
Ha gand Maria Ar Hamm  
Toud beb sadorn da noz  
Kaji 'vel yer bihan  
'Vond war-lerh ar yar goz  
O ye !

An Amerikaned  
'Reont ket a wad fall  
Fuzeou 'vez lañset  
Er Hab Kanaveral  
Pa vo arri kalz re  
A dud war an douar  
'Vo kaset alese  
Eun toullad mad d'al loar  
O ye !

Ma mamm-goz n'eus ket pell  
A zo bet en Pariz  
Hag abaoe me a wel  
Eh a da heul ar hiz  
Ne ra ket foutr ken  
Petra laro an dud  
Pe vez tomm, pe vez yen  
E lak he mini-jup  
O ye !

Ma zintin Mari-Louiz  
'Deus pevar-ugent vloaz  
Ha heuil ar yaouankiz  
A blij de'i memestra  
Pa deu d'an aod da neuï

'Vez ket pell o wiski  
He 'feskenou a-dreñv  
Gand eur monokini  
O ye !

Kement chañson a zo  
A rank mad achui  
Me h'a ivez d'am zro  
Da achui ma hini  
Ma 'peus c'hoant da gleved  
Kana c'hoaz ar zon-mañ  
'Teufeh d'ar veilladeg  
'Benn disadorn genta  
O ye !

03 a viz du 1966

### *Bonjour bonne femme*

*Eñ*

*Bonjour bonne femme, roit ho merh din, oh !  
Bonjour bonne femme, roit ho merh din  
Bonjour bonne femme, roit ho merh din  
Ne vo ket maleüruz ganin  
Bonjour bonne femme, roit ho merh din  
Ne vo ket maleüruz ganin*

Me 'h aio d'ar park da labourad, oh !  
Me 'h aio d'ar park da labourad  
Me 'h aio d'ar park da labourad  
Hi chomo er gêr da luskellad  
Me 'h aio d'ar park da labourad  
Hi chomo er gêr da luskellad

Da luskellad ha d'ober tan, oh !  
Da luskellad ha d'ober tan  
Da luskellad ha d'ober tan  
Da domma yod d'an hini bihan  
Da luskellad ha d'ober tan  
Da domma yod d'an hini bihan

Me 'vo kontant en fin ar zun, oh !  
Me 'vo kontant en fin ar zun  
Me 'vo kontant en fin ar zun  
Ma hallan kaoud ma zamm butun  
Me 'vo kontant en fin ar zun  
Ma hallan kaoud ma zamm butun

Ma zamm butun ha deg gweneg, oh !  
Ma zamm butun ha deg gweneg  
Ma zamm butun ha deg gweneg  
N'houlin 'med se digand ma gwreg  
Ma zamm butun ha deg gweneg  
N'houlin 'med se digand ma gwreg

Ha me 'vo fur beteg mervel, oh !  
Ha me 'vo fur beteg mervel  
Ha me 'vo fur beteg mervel  
Ma roit din ho merh Katell  
Ha me 'vo fur beteg mervel  
Ma roit din ho merh Katell

*Hi*

Ma merh Katell 'vo ket roet, oh !  
Ma merh Katell 'vo ket roet  
Ma merh Katell 'vo ket roet  
D'eul lonker jistr, d'eun den diboell  
Ma merh Katell 'vo ket roet  
D'eul lonker jistr, d'eun den diboell

D'eun den diboell, d'eur feneant, oh !  
D'eun den diboell, d'eur feneant  
D'eun den diboell, d'eur feneant  
D'eul lonker jistr ha gwin-ardant  
D'eul den diboell, d'eur feneant  
D'eul lonker jistr ha gwin-ardant

Ar bleo 'zo savet en ez torn, oh !  
Ar bleo 'zo savet en ez torn  
Ar bleo 'zo savet en ez torn  
Kerz da rosta ane(z) d'an ti-forn

Ar bleo 'zo savet en ez torn  
Kerz da rosta ane(z) d'an ti-forn

Da hodellou 'zo goulo-zah, oh !  
Da hodellou 'zo goulo-zah  
Da hodellou 'zo goulo-zah  
Kerz da leh all da glask eur plah  
Da hodellou 'zo goulo-zah  
Kerz da leh all da glask eur plah.

## Me 'm-oa choazet

Me 'm-oa choazet evid mestrez  
Diwallit ma mignon allo  
Me 'm-oa choazet evid mestrez  
Eur plah yaouank, eur bennherez

Teir leo hanter zo ahont d'he zi  
Diwallit ma mignon allo  
Teir leo hanter zo ahont d'he zi  
Ha pa ve(fe) peder, mond a rin

Mond a rin war varh, mond a rin war droad  
Diwallit ma mignon allo  
Mond a rin war varh, mond a rin war droad  
Mond a rankan en eur giz bennag

Tri re voutou am-eus uzet  
Diwallit ma mignon allo  
Tri re voutou am-eus uzet  
Ma mestrez o tond d'ho kweled

Med ar bevarved ne rin ket  
Diwallit ma mignon allo  
Med ar bevarved ne rin ket  
Rag unan all am-eus choazet

Kenavo neuze ma mestrez  
Diwallit ma migon allo  
Kenavo neuze ma mestrez  
Chomit hoh-unan pennherez.

## Ar basajerez

*Ar paotr*  
Peleh it-hu pasajerez  
Gand ho pagig vihan  
Gant ho pagig vihan  
Da 'n em riska war ar mor  
Evel-se hoh-unan  
Da 'n em riska war ar mor

*Ar plah*  
Me zo eur vinorezig  
Oajet a bemzeg vloaz  
Oajet a bemzeg vloaz  
Hag em-eus kalz da ziwall  
'C'hoarvezfe ganin netra  
Hag em-eus kalz da ziwall  
'C'hoarvezfe ganin netra

*Ar paotr*  
Ho pagig hag ho kened  
Zo ken skeduz ha koant  
Zo ken skeduz ha koant  
Evel eur benitiouer  
A vez aour pe arhant  
Evel eur benitiouer  
A vez aour pe arhant

*Ar plah*

Ar plah 'defe ar gwalleur  
Na da goll heh enor  
Na da goll heh enor  
'Vez mezuz dirag Doue  
Disprizet gand an oll  
'Vez mezuz dirag Doue  
Disprizet gand an oll

*Ar paotr*

N'eo ket 'vid koll hoh enor  
Nag ivez ho kwerhded  
Nag ivez ho kwerhded  
E teu din-me plah yaouank  
Da gemer liberted  
E teu din-me plah yaouank  
Da gemer liberted

*Ar plah*

Goude 'vez re ziwevad  
Evid dond da ouela  
Evid dond da ouela  
An enor pa vez kollet  
N'heller ket e brena  
An enor pa vez kollet  
N'heller ket e brena

*Ar paotr*

O me zo eun den yaouank  
A gar beza sekred  
A gar beza sekred  
Na ouzon ket ar feson  
Da hodisa ar merhed  
Na ouzon ket ar feson  
Da hodisa ar merhed

*Ar plah*

Me zo eur vinorezig  
Oajet a bemzeg vloaz  
Oajet a bemzeg vloaz  
O ! paotr yaouank diwallit  
'C'hoarvezfe din netra  
O ! Paotr yaouank diwallit  
'C'hoarvezfe din netra

*Ar paotr*

Rag se 'ta plahig yaouank  
Ma dous ma harantez  
Ma dous ma harantez  
'N em ambarkit en ho pag  
Ha ma hasit ivez  
'N em ambarkit en ho pag  
Ha ma hasit ivez

*O-daou*

A-benn eur pennad amzer  
Ni 'vo on-daou kontant  
Ni 'vo on-daou kontant  
Na da veza uniset  
Gand roue ar firmamant  
Na da veza uniset  
Gand roue ar firmamant.

## Ar palourded daonet

Ha klevet az-peus  
An traou a ha a-dreuz  
En Nantouar  
Ha Yannig en aod  
'Zo krog da hoari e baotr  
'N e derouar  
Dre oll 'ma ar gaoz  
Deuz Porz-Gwenn da Berroz  
A vo karget  
Trézenn Nantouar  
Du-hont kichenn ar *phare*  
Gand palourded

Kanfarded Pempoull  
A zo hervez o houll  
Eun tamm tachenn  
Lakaet 'deus 'n o 'fenn  
Dond da blanta kregin  
War an drézenn  
Med amañ 'velkent  
'Ma an avel a-benn  
Krog da hweza  
Ha paotred Pempoull  
A vo kaset d'o zoull  
Da gokouza

Med ar Vretoned  
A zo 'vel 'vez laret  
Pennou kaled  
Diredom d'ar mor  
Ma vo serret an nor  
D'ar palourded  
Tud an douarou  
Dilezit ho parkou  
Deuit d'on zikour  
Da vounta er-maez  
Da gas diwar an tréz  
An enebour

Paotred ha bagou  
Nantouar porz garo  
Bezit war evez  
Ma taolfom er-maez  
Du-ze diwar an tréz  
Ar ganaillez  
Amañ bord an aod  
Pesquetaer martolod  
Zo kounnaret  
Ha ne vez ket brao  
Koueza dindan o 'fao  
Pa vezont fachtet

Sant-Erwan on tad  
C'hwi a oa alvokad  
An dud gwasket  
Diwar an drézenn  
'Reom deoh eur bedenn  
D'on zikoured  
C'hwi Santez Anna  
'Zo patronez amañ

En Treleven  
Deuit d'on zikour  
Da skei an enebour  
Foñs an ifern.

26 a viz c'hwevrer 1987

## Ar morad braz

Er bloaz seiz ha tri-ugent  
Soñj a-nevo an dud  
'Vid degas tud d'ar vro-mañ  
A oa greet kalz a vrud  
E miz meurz e oa laret 'vije eur morad braz  
Eur morad 'dlee beza  
Seurt 'oa gwelet biskoaz

Skrivet 'oa hag embannet  
Kaset dre oll ar gaoz  
'Oa ar mor 'vond da zouza  
Hanter-hent da Vro-Zaoz  
Kredet 'devoa tud ar vro  
Hag ivez tud Pariz  
E vije dizoloet  
Zoken ar gêr a Is

Tud zo deuet a vilierou  
Hed-ha-hed aochou Breiz  
An ormel a dispako  
Dibabet 'vo a-leiz  
An eil etre treid egile  
Stankoh evid merien  
Pep hini a dibabje  
'Tre nao ha deg dousenn

Ha setu an douristed  
Tapet da besk-ebrel  
Ar mor n'e-neus ket tehet  
Kenavo d'an ormel  
Rag morad braz ar hantved  
E-neus greet eun taol-heg  
Tapet zo bet d'an hirra  
Diou ormelenn 'tre deg

Gwelet 'm-eus krak-aotrounez  
O tistrei deuz an aod  
Me lar deoh ar wirionez  
'Oa ket pounner o lod  
Ha gand o intronezed  
O-deus bet kalz a boan  
Sacha o zreid mesk ar herreg  
Gand o zalonou moan

An ormel a 'n em chouche  
An eil kichenn eben  
Etre treid an douristed  
O winkal en dour yen  
Ha deuz aocheier Perroz  
Honnez he-devo soñj  
Rag eun tanfoueltenn krank  
A oa krog en he foñz

Diou ormelenn o silaou  
E-kichenn eur garreg  
'Deus klevet eur gaoz nevez  
Na oa ket brezoneg  
*C'est la marée du siècle*  
*Ca n' se voit pas souvent*  
Hag an ormel a zoñje  
Ar panerou 'vo skañv

Ha morad braz ar hantved  
'Neus c'hoariet e dro  
Bourdet 'neus an douristed  
Kenkoulz 'vel tud ar vro  
Evid koll eur varead  
Reom ket a wad fall  
Kemerom kalz a gouraj  
'Benn kant vloaz 'vo unan all.

Maria Prat ha Jean Derrien  
1967

II

Ar hanaouennou a gane Jean Derrien

## Soubenn al lêz

En eur gomañs kana  
Eskuz a houlennan  
Digand kement hini  
A zo prezant amañ.

Digorit din an nor  
Mar bez ar vadelez  
Me zo deuet da degas  
Deoh soubenn al lêz.

Sonit 'ta sonerien  
Sonit munud ha gê  
Ema soubenn al lêz  
O vont war an trebez.

Sonit 'ta sonerien  
Sonit munud ha stank  
Ema soubenn al lêz  
O vond war ar bank.

A-berz an ozah yaouank  
Din e oa kemennet  
Rei deo soubenn al lêz  
Noz kenta o eured.

Med 'leh soubenn al lêz  
Me roas dezo da eva

Malaga ha champagn  
Likeur deuz ar gwella.

Biskoaz neuent tañveet  
Ar seurt-mañ barz ar vro  
Me 'm-eus hen degaset  
Esprez euz a Vordo.

Neus priñs na baron  
Roue na empereur  
A gement e-nefe  
Tañveet ma likeur.

Me a zo deuet fenoz  
Evid ho regali  
An tañva kenta a vo  
D'ho pried ha c'hwi.

An eil tañva 'vo  
D'an daou zen a enor  
O-deus ho konduet  
Deuz taol ho redemptor.

An drede tañva 'vo  
Ha d'ho mamm ha d'ho tad  
O-deus kalz a hlahar  
O tond d'ho kuitaad.

Da bevare e pedan  
Breudeur ha c'hoarezed  
Kement a zo amañ  
Kerent ha mignoned.

Ar bradelez eo  
Kaerra tra a zo er bed  
Gand Doue e-unan  
Eo bet etabliset.

Pa oa krouet Adam  
Gand krouer ar bed-mañ  
E oa roet Eva  
Evid pried deañ.

Gand se 'ta tud yaouank  
Bevit en esperañs  
Hag e souetan deoh  
Prosperite ha chañs.

## Son ar martolod

Tud yaouank tostait da gleved  
Eur zon zo nevez gompozet  
A zo savet 'vid ar bloaz  
Etre daou zen yaouank  
A deuiio o-daou amañ  
A beb eil da gana.

Boñjour ha joa ma dousig Janed  
Pell 'zo n'am-eus ket ho kwelet  
'Glevan ket ho kelou  
War bont ar vatimant  
Na gweled ho lizerou  
Ha me 'm-oa nehamant.

Estonet braz on euz ho kweled  
Kalz muioh c'hoaz euz ho kleved  
Ma na skriven ket me deoh  
C'hwi na skrivit ket din  
Hag evelse me 'm-oa leh  
Da gaoud kalz a zoursi.

Ya gwir mad eo pezh 'm-oa laret  
Med me gav din 'peus ma zrompet  
Klevet am-eus a berz vad  
War galz a lizerou  
Penaos e reh diouzin goap  
Pa oan pell deuz ar vro.

O ma eo dre faoz keloïou  
Ho-peus bet war ho lizerou  
Ez oh deuet beteg amañ  
Evid ma aprouvi  
Chom trañkil, deoh e laran  
Deuit ket d'am frekanti.

Kalz a rezon 'peus ma mestrez  
Me n'ho karin ket sur jamez  
N'eo ket kleved gand tud all  
Eo bet din ar rezon  
Me houeze 'baoe ar wech all  
Rafoh din traizon.

O ! Traizon sur ne ran ket  
Med, deoh me ne zimezin ket  
Rag gweled a ran evidant  
Dirag ma daoulagad  
Ho-peus demeuz ho tougen  
Eur marh hag a vale mad.

War gezeg me ne volean ket  
War eur plañkenn ne lavaran ket  
Med c'hwi gwreg d'eur martolod  
Ne vefoh birviken  
Peotramant sur ho-po lod  
Demeuz a cheñch soubenn.

O ! Lavarit 'vel ma kerfet  
Martolod ne gemerin ket  
Rag kalz demeuz ar re-ze  
Pa vezont o veaji  
Ankouae buan o gwragez  
'Vezont paotred dizoursi.

Ya me 'gred din 'zo kalz ane(z)  
A blijfe gante ober ze  
Med c'hwi plah yaouank charmant  
Gand an oll admiret  
A choazo heb nehamant  
An hini a garfet.

Me a gemero eur micherour  
Hag a n'aïo ket 'uz d'an dour  
N'am-mo ket a nehamant  
Ken nebeud poan-spered  
Pa deuio barriou tourmant  
Gand aon e vefe beuzet.

Ya neuze c'hwi vo evuruz  
Med eun tammig 'vïoh maleüruz  
Ho pried 'vo barz ar gêr  
C'hwi chomo tost dezañ  
Kaji 'vel eur goz-komer  
Da zelled dioutañ.

Arsa martolod ! Klevit 'ta  
N'eo ket poent deom c'hoaz finisa  
It da glask ho patimant  
Zo e-kreiz ar mor braz  
Rag hervez ma zantimant  
Nim n'em glefom ket c'hoaz.

Neuze 'ta plah yaouank treitour  
Han da bartia 'uz d'an dour  
E-leh ma vin luskellet  
Taolet ha distaolet  
Ne lakain ket ma spered  
Da zoñjal er merhed.

Ni ho ped martoloded yaouank  
Na lakait ket ho santimant  
Da gared ho mestrezed  
Gand re a garantez  
Peotramant ma vloh trompet  
C'hwil ho-po keuz goude.

## Mari-Vastrouill

Me zo 'paouez koll ma mestrez  
Eet eo kuit deuz ti he zad  
Larit din ma 'peus he gwelet  
Ha ma kavin 'nezi c'hoaz.

### *Diskan*

*Keuz am-eus da Vari-Vastrouill  
Keuz am-eus da Vari-gêz  
P'leh an diaoul he havin bremañ  
Kollet 'meus ma Mari-gêz.*

Mari-Vastrouill zo luche  
Eur fri togn zo ganti c'hoaz  
Lagad pikouz, pikou panez  
Ha me oar petra c'hoaz.

Kalz re verr e oa he lostenn  
A lare an teodou fall  
'Ran ket forz euz pezh a laront  
Mari-Vastrouill 'dalv eun all.

Kreñv eo Mari 'vel eur gazeg  
Hag a friñg e-kreiz ar prad  
Spontet 'vefeh ha ma welfeh  
Pegen hir eo he daoudroad.

C'hwaz al ludu a zo gand Mari  
Na 'vid se 'deus ket he 'far  
D'ober krampouez gand bleud malet  
Lêz ar zaout ha viou yar.

Me a varvo ma n'he havan  
Ma halonad zo leun-barr  
Klaskit Mari ma zud karet  
Kement hini zo din par.

## Gwerz ar miliner

Setu echu ma devez  
Sonet an anjelus  
Hag en tu all d'ar menez  
An heol o vond da guz  
Ro peoh eta ma halon  
Re greñv 'skoez ennon  
Plijaduriou ar bed-mañ  
N'int ket greet evidon.

Pa droan ma daoulagad  
Etrezeg ar vilin  
Ne welan den mui siwaz  
A rafe din eur zin  
Ne welan ket ma mignon  
Erwan ma harantez  
Rag eet eo da vrezeli  
Abaoe warlene.

Rag eet eo da vrezeli  
Kaset d'ar broiou pell  
Ranket e-neus dilezel  
E vro gaer Breiz-Izel  
Ranket e-neus dilezel  
Ar paour-kêz plahig koant  
A zo chomet heh-unan  
Gand ar brasa tourmant.

En noz pa luch ar stered  
A-uz d'ar hoadig pin  
'Vid luskellad ma glahar  
E ran tro ar vilin  
Amañ 'veze o poania  
Euz ar beure d'an noz  
Amañ 'teuem da azeza  
Om-daou war ar bank koz.

Selaouit Gwerhez Vari  
A zo du-hont en neñv  
Selaouit mouez ar plahig  
'Zo mantret heh ene  
Pa houlen a greiz kalon  
Beb noz war he daoulin  
Ma teuo endro Erwan  
D'ar gêr barz ar vilin.

Fañch Danno

## Son an hañv

Deuet eo an hañv, kaer an amzer  
An heol gand e domnder (2 wech)  
War an douar a skuill bemdeiz  
Ar laouenidigez la-la-a

### *Diskan*

*Kanom, kanom*  
*Pa eo deuet an hañv*  
*D'an eostig da gana*

Er parkeier an ed melen  
A hej, a bleg o 'fenn (2 wech)  
Kalon labourerien-douar  
M'ho-po eun eost dispar la-la-a

Er prad e sav leiz a vleuniou  
C'hwez vad gand o deliou (2 wech)  
O, nag eo koant on Breiz-Izel  
Marellet he mantell la-la-a

Ar mor zo torret e gounnar  
Hag e pok d'an douar (2 wech)  
War an aochou tud dinerzet  
Deuet da glask ar yehed la-la-a

Ar lapoused en beg ar gwez  
A gan o harantez (2 wech)  
O, lezit int bugaligou  
Da ober o neizioù la-la-a

## Bleuniou o tremen

Pa oan ar mintin-mañ  
O vond da gerhad dour  
E klevis an eostig  
Er hleuz o kana flour

En e zon e lare  
Kuzet gand an deliou  
Dre ma astenn an hañv  
E koll ar bleuniou o liou

Miz mae zo eet en-dro  
Gand an nevez-amzer  
Bremañ 'c'hwez an heol tomm  
D'ar bleuñv zo re bounner

Bleuniou, ped ahanoh  
A weñv bemdeiz bremañ  
Bleuniou koant o tremen  
Buan diouz ar bed-mañ

Ne chom ket pell ar bleuñv  
Da deurel o c'hwez vad  
Red eo dezo gweñvi  
Red eo dezo kuitaad

Ar rozenn bet ken kaer  
A zizeh war he bod

Pennherez Kerbendrez  
A zisliv ruz he chod

Evuruz o ya evuruz  
An neb a varv yaouank  
War e vez a vernier  
Ar bleuniou stank-ha-stank

Evuruz eo ar werhez  
A dremen 'vel ar roz  
He hwez glan ouz he heul  
A bign d'ar baradoz

Hag an eostig gand herr  
A dehas dirazañ  
En eur gana sioulig  
Diweza poz e zon

Pennherez Kerbendrez  
'Varvas 'tro hanternoz  
Tremen a reas ivez  
'Vel ma tremen ar roz

An eostig a gane  
E-kichenn ar feunteun  
Gand an nevez-amzer  
Eo e tremen ar bleuñv

Me 'wel d'ar baradoz  
O pignad gand eur skeul  
Eur vleuñennig tener  
Hag he hwez vad d'he heul

Eostig Kerineg

## Êzennig flour

Êzennig flour, êzenn dispar  
Buhez an noziou sioul ha pouezuz  
Te 'had ar spi war an douar  
Gand eur pok dous ha karantezuz.

Ar hlizenn a ziskenn ganit  
En kalon ar bleuniou mousc'hoaruz  
Hag en eur stoui a ro dit  
Evel trugarez o c'hwez meluz.

Er brouskoajou sioul ha didrouz  
Da alan a zihun en deliou  
O luskellad 'n o neizig dous  
Da vignoned an evnedigou.

An eostig-noz er hoad uhel  
A gan dit e zon arhantet  
Ha te, laouen, a-denn-askell  
He doug d'an oabl glaz steredennet.

Koulmig Arvor

## Ar visiklet

An deiz all eur paotrig yaouank  
An deiz all eur paotrig yaouank  
Da vond da bourmen e-noa c'hoant  
Tra la la la  
Da vond da bourmen e-noa c'hoant.

Ma kemeras e visiklet  
Ma kemeras e visiklet  
D'ober eun tamm tro e oa eet  
Tra la la la  
D'ober eun tamm tro e oa eet.

Deuz an noz pa zeuas d'ar gêr  
Deuz an noz pa zeuas d'ar gêr  
E dad a oa souezet kaer  
Tra la la la  
E dad a oa souezet kaer.

Penaoz ma mab paour, emezañ  
Penaoz ma mab paour, emezañ  
Diou visiklet e-teus bremañ  
Tra la la la  
Diou visiklet e-teus bremañ.

Kredi a ran 'peus he laeret  
Kredi a ran 'peus he laeret  
Esplika din a vezo red

Tra la la la  
Esplika din a vezo red.

O ya ma zad me a espliko  
O ya ma zad me a espliko  
Neuze sur mad c'hwi a gompreno  
Tra la la la  
Neuze sur mad c'hwi a gompreno.

Hirie pa oan eet da bourmen  
Hirie pa oan eet da bourmen  
'M-eus kavet ma dous war ma hent  
Tra la la la  
'M-eus kavet ma dous war ma hent.

An amzer a oa tomm-meurbed  
An amzer a oa tomm-meurbed  
Hag an disheol a-meum klasket  
Tra la la la  
Hag an disheol a-meum klasket.

War ar yeot glaz pa oam azezet  
War ar yeot glaz pa oam azezet  
Kalz deuz he dillad 'deus tennet  
Tra la la la  
Kalz deuz he dillad 'deus tennet.

Pa oa dija hanter-diwisket  
Pa oa dija hanter-diwisket  
Ma dous din he-deus laret  
Tra la la la  
Ma dous din he-deus laret.

Deus em hichenn 'ta, emezi  
Deus em hichenn 'ta, emezi  
Me 'roio dit pez a gari  
Tra la la la  
Me roio dit pez a gari.

Kredi 'reoh n'on ket bet nehet  
Kredi 'reoh n'on ket bet nehet  
Me 'm-eus choazet he bisiklet  
Tra la la la  
Me 'm-eus choazet he bisiklet.

## Boñjour ma mestrez

*Eñ*

Boñjour deoh ma mestrez  
Terrupl ho kavan cheñchet  
Abaoe diweza gwech  
Oan-me bet euz ho kweled

*Hi*

Peleh ma zervijer  
Ne vefen ket me cheñchet  
Klañv on war ma gwele  
Pevar miz 'zo tremenet

*Eñ*

Ma d'oh war ho kwele  
Gwallgaset gand ar hleñved  
C'hwi 'gembro diganin  
Eun draig vad bennaked

*Hi*

O nann ma zervijer  
Evid dibri me ne ran ket  
Eur bannahig gwin dous  
A h'evan deuz ma zehed

*Eñ*

Me 'm-eus du-mañ gwin koz  
Deuz eured ma maeronez

Ha me degaso deoh  
Ma deziret, ma mestrez

*Hi*  
Gwelloh eo din-me dour  
Deuz feunteun eur gwir amour  
Evid n'eo gwin tennet  
Deuz barrikenn eun treitour

*Eñ*  
Deoh-c'hwi ma mestrezig  
Ya, deoh-c'hwi a zouetan  
Ma na karfet biken paotr  
Keit ma vin-me er bed-mañ

*Hi*  
Deoh-c'hwi ma zervijer  
Deoh a zouetan ivez  
Da gavoud eur plah koant  
Ha deoh kalz a vugale

*O-daou*  
Ne dalv netra d'an den  
Chom da gemer poan-spered  
Kenavo deoh 'laran  
Kenavo 'r henta gwelet

## Ar vilin avel

'Ma Fransez er vilin avel oh ! oh ! oh !  
'Ma Fransez er vilin avel  
Ha kavoud a ra hir an amzer  
War vordig an enezenn  
Ha kavoud a ra hir an amzer  
War vordig al lenn

Eñ a helv ar besketaerien oh ! oh ! oh !  
Eñ a helv ar besketaerien  
Da zond davetañ d'ar vilin  
War vordig an enezenn  
Da zond davetañ d'ar vilin  
War vordig al lenn

Pesketaerien din-me lavarit oh ! oh ! oh !  
Pesketaerien din-me lavarit  
Mari-Joze e peleh eo eet  
War vordig an enezenn  
Mari-Joze e peleh eo eet  
War vordig al lenn

Ema en he gwele kousket oh ! oh ! oh !  
Ema en he gwele kousket  
Ha hi a lar ne zavo ket  
War vordig an enezenn  
Ha hi a lar ne zavo ket  
War vordig al lenn

Ken ma sono kloh Louaneg oh ! oh ! oh !  
Ken ma sono kloh Louaneg  
D'an dud da vond d'an oferenn-bred  
War vordig an enezenn  
D'an dud da vond d'an oferenn-bred  
War vordig al lenn

Ken 'skoio an heol war an treujou oh ! oh ! oh !  
Ken 'skoio an heol war an treujou  
Ma gello lakaad he boutou  
War vordig an enezenn  
Ma gello lakaad he boutou  
War vordig al lenn

Ha dispaka he zaeiennou oh ! oh ! oh !  
Ha dispaka he zaeiennou  
'Vid mond d'ar zul d'ar pardonioù  
War vordig an enezenn  
'Vit mond d'ar zul d'ar pardonioù  
War vordig al lenn.

## Al lezvamm

Me 'm-oa bet eul lezvamm  
Hag a oa kriz ha kaled  
Diou teir eur 'raog an deiz  
Ganti me 'vije savet  
Da vond da gerhad dour  
Da feunteun ar waz haleg

Ar 'feunteun a oa pell  
An dour a oa strafuillet  
Gand mab eun denjentil  
Oh abeuri e gezeg  
Hag eñ o houl diganin :  
Plahig, c'hwi 'zo dimezet ?

Med me 'oa ken yaouank  
Ha respontis ne oan ket  
Eñ o kregi em dorn  
'Vid ma has er valaneg  
Eno 'lakaas ahanon  
Da zelled ouz ar stered

Pa zavis ahane  
Ma dillad a oa joget  
Ma halon a lampe  
Ha ma horf a oa brevet  
Ha me 'zoñje neuze  
Petra 'm-eus amañ kollet ?

Neuze deuz e hodell  
E roas din pemp kant skoed  
Kerzit d'ar gêr plahig  
Larit d'ho tud oh dimezet  
D'eur havailler yaouank  
O tistrei deuz an Naoned

Pa oan o tond o vond  
Dre hentou braz Plouared  
Me 'glevis ar hleier  
O soni evid ma eured  
Me 'glevis ar hleier  
O soni evid ma eured.

## Leuskit ho pro

*Eñ*

Leuskit ho pro plah yaouank  
Ha deuit ganin d'am bro  
Me 'breno deoh eun habit  
Ar haerra danvez 'zo  
Me 'breno deoh eun habit  
Eun habit satin gwenn  
Hag an oll em bro 'laro  
'Mo bet eur bolezen

*Hi*

Ganeoh d'ho pro den yaouank  
Ganeoh me n'a h in ket  
Ken 'vin bet barz an iliz  
Dimezet hag eureujet  
Ken 'vin bet barz an iliz  
Dimezet hag eureujet  
Ha lakaet din war ma biz  
Eur walenn alaouret

*Eñ*

Leuskit ho pro plah yaouank  
Ha deuit ganin d'am bro  
Me 'breno deoh eun habit  
Ar haerra danvez 'zo  
Me 'breno deoh eun habit

Eun habit satin griz  
Hag an oll em bro 'laro  
'Mo bet merh eur markiz

*Hi*

Ganeoh d'ho pro den yaouank  
Ganeoh me n'a h in ket  
Ken 'vin bet barz an iliz  
Dimezet hag eureujet  
Ken vin bet barz an iliz  
Dimezet hag eureujet  
Ha lakaet din war ma biz  
Eur walenn alaouret

*Eñ*

Leuskit ho pro plah yaouank  
Ha deuit ganin d'am bro  
Me 'breno deoh eun habit  
Ar haerra danvez 'zo  
Me 'breno deoh eun habit  
Eun habit satin glaz  
Ma n'hellom chom war zouar  
Ni h aï war ar mor braz

*Hi*

Ganeoh d'ho pro den yaouank  
Ganeoh me n'a h in ket  
Ken 'vin bet barz an iliz  
Dimezet hag eureujet  
Ha lakaet din war ma biz  
Eur walenn alaouret  
Neuze me h aï ganeoh-c'hwil  
Ken pell ha ma karfet.

## An hini a garan

An hini a garan  
Gwechall hi am hare  
Kana 'reen pa gane  
Pa ouele me ouele  
On halonou on-daou  
Ne reent nemed unan  
Pa oan bihan er gêr  
An hini a garan

An hini a garan  
Bremañ 'deus ma leusket  
Eet eo d'ar broiou pell  
D'eur vro n'anavezan ket  
Eet eo d'ar broiou pell  
Da hounid kalz a arhant  
Kollet, kollet am-eus  
An hini a garan

D'an hini a garan  
Ne ran nemed gouela  
Penaos pell diouti  
E hellin-me beva  
Med petra 'laran-me  
Huñvreal aliez 'ran  
O soñjal adarre  
En hini a garan.

## Al lemmer

Pa oa achu ma studi  
E kêrig Sant-Brieg  
Ma mamm a grede dezi  
'Vijen eet da veleg  
Med koantiz ma mestrezig  
A lakaas din em 'fenn  
Sevel buan eur hêzig  
Da veva 'n he hichenn

Med setu goude tri miz  
Ma zurzunell faro  
Nijet buan da Bariz  
Heb lared kenavo  
Neuze rankis adkemer  
Micher ma zadou-koz  
Ha bale ma maen-lemmer  
Euz ar beure da noz

Me 'lemm e falz d'ar mevel  
Koulz ha d'ar bennherez  
Ha d'ar paotr-saout e gontell  
'Vel d'ar geginerez  
Ar gizell hag ar hleze  
Sizaill ar hemener  
Heskenn an aotrou kure  
Bouhal an aotrou maer

'N eur vond gand an hent didrouz  
Me a gan a-bouez-penn  
Gwerziou Yannig Ar Minouz  
Hag ivez Dal Ar Gwenn  
Deuit da zelaou ma zoniou  
Ha c'hwi 'gavo sur mad  
Diverglet ho kalonou  
Lemmoh ho taoulagad

Redet am-eus ar hêriou  
E pevar gorn Bro-Hall  
Gwelet am-eus pardonious  
Gwelet am-eus traou all  
Bro ar menezious uhel  
Bro ar plaennou braz  
Ken koant ha ma Breiz-Izel  
N'am-eus gwelet biskoaz

Ma stad a zo gwall zister  
Med plijoud a ra din  
Gand se me chom dibreder  
En despet d'ar gozni  
'M-eus na kerent na madou  
Dineh eo ma spered  
Me 'draillo falh an ankou  
War ma lerim garet

Evnig Penn ar Hoad

## Ar matolod tregeriad

Me 'zo ganet en Landreger  
An Arvor eo ma mamm-bro  
D'an douar teir gwech pe beder  
Martolod 'm-eus greet an dro  
Daoust pegement am-eus redet  
Ar broiou ar muia brudet  
N'am-eus kavet c'hoaz hini  
Da dalvezoud or bro-ni

Em farrezig pa oan krennard  
O, nag em-oa plijadur  
Oh en em guza 'vel eur hlujar  
Mesk al lann hag ar glazur  
Hag e-kreiz sioulder ar maeziou  
Leh ma kan an evnedigou  
Me chome beteg an noz  
Da lenn istor ma bro goz

Eun devez o vond dibreder  
Hed-ha-hed gand ribl ar mor  
E klevis eur plahig tener  
O kana war doull he dor  
Hag ouz he hleved me 'zoñje  
Penaos ma plije din bale  
'Vije gweloh din sur mad  
Biken Bro-Dreger kuitaad  
'Benn eur pennad amzer amañ  
Pa vin skuiz o torna dour

Adarre me teuio da veva  
Du-hont e disheol an tour  
Diouz Kervarzin da Berwenan  
Dineh evel eul laouenan  
Me 'hortozo eun termen berr  
Da vond da weled Sant Per.

Kenvroiz tudou kaloneg  
Me ho ped dalhom ervad  
D'on gizioù koz, d'on brezoneg  
O ya ken stard ha d'on gwad  
Karom, c'hoarzem, bezom seder  
Med heb dizrei ouz on dever  
Ha 'vid echui ar zon  
Kanom oll a-greiz kalon

**Diskan**

*Bro-Dreger me zo dit bugel  
Ha me 'gar 'hanout  
Dreist an oll broioù  
Biroiken n'hallin dilezel  
Na dond da ankouaad  
Bro ma zadou.*

**Evom jistr**

Deuz Landreger da Lanuon  
Zo bet savet meur a zon  
Diwar-benn ar jistr melen  
Diwar-benn an everien

Tud desket, louzaouerien  
Barzed ha skrivagnerien  
A-viskoaz da jistr Arvor  
O-deus kinniget enor

Gwechall me zo bet er skol  
Gand boutou-koad ma breur Pol  
N'on ket akuit da skriva  
Med jistr mad me 'oar eva

Ma mamm-goz ha ma mamm-guñv  
A 'h eve jistr diwar yun  
Hag araog mond d'o gwele  
Jistr a event adarre

Pa oa sakrist ma zad-koz  
Eh eve jistr deiz ha noz  
Ne oa ket e barz ar vro  
Da gana "Tantum-Ergo"

Ma mestrez a oa lipouz  
Ha gand eur bannah jistr dous

E teuis d'ober dezi  
Plega da veza gwreg din  
On merhig vihan Janed  
A zo nevez dizonet  
Ha dija barz ar volenn  
E plij dezi chistr melen

Ma mamm-gaer en imor fall  
Pa deu du-mañ da hroñial  
Eur bannah jistr 'n eur skudell  
Dioustu 'ra dezi tevel

Ma nije Mathuzalem  
Kavet e Jeruzalem  
Jistr koz ha mad e vije  
Beo c'hoaz hirie marteze

Me ivez 'm-eus ar gredenn  
Chom da ober koz krohenn  
Med forz pegeid e vevin  
Jistr alaouret a 'h evin

Eur bannah jistr pa n'evin ken  
'Hallfet lared paour-kêz den  
Feiz n'eus ket da lared nann  
An taol-mañ eo paket Yann

#### **Diskan**

*Evom jistr Bretoned  
Rag n'eus netra ken mad  
Evom 'ta mignoned  
Beb a chopinad*

## **Pennherrez Penn-ar-Roz**

*Eñ*

Me am-meus eur vestrezig e Penn-ar-Roz (*2wech*)  
Hag e redin d'he gweled heb mann gortoz  
Hag e redin d'he gweled disul da noz

*Hi*

Ha ma teuez d'am gweled ma hloareg koant  
Me en em droio en eur pesk er stêr arhant  
N'az-pezo ket ma halon hervez da c'hoant

*Eñ*

Ma en em droez en eur pesk 'vel ma lerez  
Me a vo pesketaer o ma mestrez  
Me besketo ma dousig dre garantez

*Hi*

Ma teuez d'am fesketa ha d'am spouron  
Me 'en em droio en heizez er hoajou don  
N'az-pezo tamm, kloaredig euz va halon

*Eñ*

Ma en em droez en heizez 'vel ma lerez  
Me a vezo chaseour o va mestrez  
Me chaseo ma dousig dre garantez

*Hi*  
Ma teuez d'am chaseal riskl d'am muntri  
Me en em raio leanez 'n eun abati  
N'az-pezo ket ma halon o kloareg kriz

*Eñ*  
Ma en em rez leanez 'vel ma lerez  
Me a 'h aio da vanah o ma mestrez  
Me govesao ma dousig dre garantez

*Hi*  
Ha ma teuez d'am hovez 'oueli c'hwero  
Gwenn-kann maro em gwele te am havo  
Roin ket dit va halon kaer az-pezo

*Eñ*  
Ma da gavan gwenn-maro ez kwele-kloz  
Leh Sant-Per a gemerin er baradoz  
Da digeri d'am dousig euz Penn-Ar-Roz.

Charlez Ar Braz

## Son ar jistr

Kanom hirie ma mignoned  
Kanom war an dro  
Ar jistr koz hag ar jistr nevez  
Brudet en peb bro  
Gwella evaj zo er bed-mañ  
Hag ouspenn ze ar yahusa

Ar jistr mad gwad an avalou  
Sklêr evel dour aour  
'Dorr e zehed d'ar pinvidig  
Kenkoulz ha d'ar paour  
D'an dud koz ha d'ar vugale  
A ro nerz leiz o jave

Ar jistr dous a garg a furnez  
Penn ar yaouankiz  
D'on merhigou a ro ivez  
Gened ha koantiz  
Douster a laka en o zellou  
Ha karantez en o halonou

Ar jistr mad a zo burzuduz  
Evid ar gozni  
Netra ne skarzas eveltañ  
An droug izilli  
D'hen eva ma hallfen derhel  
Birviken ne rankfen mervel  
Pa vo deuet on zro eun devez

Da vond d'ar bed all  
Diskennom en karr an ankou  
Heb ober gwad fall  
Du-hont pep hini a gavo  
Jistr da eva pezh a garo

Ra vezo ar jistr enoret  
En Breiz a beb tu  
Hag ar gwin-ardant tanfoueltret  
Gand ar malloz ruz  
D'on bro garet trinkom bremañ  
Rag ma goug zo krog da zeha

**Diskan**

*Taol ha taol*

*Ale paotred, jistr d'an daol !*

*Taol ha taol*

*Ale paotred, jistr d'an daol !*

## Silvestrig

Etre chapel Sant-Eflamm  
Ha tosenn Menez-Bre  
Zo eun ofiser yaouank  
Gantañ eur pezh kleze  
Zo eun ofiser yaouank  
O sevel eun arme  
Me 'm-eus eur mab Silvestrig  
A lavar mond ivez

Siwaz aotrou kabiten  
'M-eus ket mab nemetañ  
Ha c'hwi 'po ar vadelez  
Da lezel anezañ  
Allaz tad-koz maleüruz  
Ar marhad zo sinet  
Touchet e-neus an arhant  
D'an arme rank moned

An tad beb noz ha bemdeiz  
Ne baouez da zoñjal  
En e grouadur yaouank  
En arme e Bro-Hall  
Neuze e-kreiz e anken  
'En em stag da ouela  
Aotrou Doue, Silvestrig  
Petra deu da veza ?

Pa oa an tad glaharet  
Oh ober e glemmou  
Setu e vab Silvestrig  
'Toull an nor o selaou  
Paouezit tad ankeniet  
Paouezit da ouela.  
Sellit ho mab Silvestrig  
'Zo degouezet amañ.

## En Tregastell

En Tregastell war an dosenn  
'Uz d'ar richer ha d'an trêz  
Me 'm-eus savet eun ti bihan  
E-unanig war ar mêz  
Ar gouelaned hag ar skreved  
Deu da nijal beteg toull ma dor  
Ha me 'm-eus 'vid ma luskellad  
Kan an avel, trouz ar mor

Na bloaveziou 'm-eus tremenet  
'N eur gêr vraz pell euz ma bro  
N'am-eus kavet an evurusted  
Med abaoe on deuet en-dro  
Barz ma bag pa c'hwez an avel  
En eur astenn ma goueliou gwenn  
Me a gan soniou Breiz-Izel  
En brezoneg a-bouez-penn

Pesketaerien bro Lanuon  
Dêuz Ploumanah d'ar Porz-Gwenn  
E welan amañ pe du-hont  
En-dro d'ar Zeiz-Enezenn  
En fin an deiz war an inizi  
An noz sioul 'led he mantell  
Touriou-tan krog da lugerni  
A beb tu war an dremmwel

Ganin-me ma muia-karet  
A zo ken joañz ha me  
Rag on-daou om bet unanet  
Gand trubuilhou ar vuhez  
Ha da hortoz ar baradoz  
Gand e zent hag e êlez  
Ni on-eus kavet ar repoz  
En eur bed a garantez

Fañch Danno  
30 a viz eost 1964

## Gwerz paotred Plouillo

Ma 'mije spered da gompren  
Evel am-eus faltazi  
Me a vije en em implijet  
Da zond da gompozi  
Eur himiad leun a hlahar  
Greet d'ar goñskrived yaouank  
O-deveus tennet d'ar billed  
E-barz ar bloavez prezant

Barz ar bloavez mil eiz kant c'hweh  
Ar bemp a viz gwengolo  
A zo degouezet adarre  
Deuz a barrouz Plouillo  
Tud yaouank evid an arme  
Tud e-touez an terrupla  
Glaharet eo o oll lignez  
P'o gwelont o partia

Da bartia gand an aktiv  
A zo degouezet pevar :  
Erwanig Jacob deuz ar bourk  
Ha Gwill-Yann ar Meledar  
Ha Yannig Prat deuz ar Hoadou  
Ha Pipi an Avean  
Pevar den deuz ar brava  
Korfou kaer ha tud vaillant

Erwanig Jacob a lare  
An deiz-ze d'e gamarad  
Hemañ zo eun devez trist  
Hag a ra din kalonad  
Gweled ma mamm baour o ouela  
Ha ma zad kêz ankeniet  
Ma halonig e-barz ma hreiz  
Zo dija kazi rannet

Kalz a zoñjfe deze marteze  
Penaoz e vezen eur poltron  
Em-bez aon rag eun tenn fuzuill  
Pe rag eur bouled kanon  
Peotramant aon rag ar skuizder  
O vale dre an hentou  
Pe kousked war eur gwele koad  
E-barz ar hordegardou

Dougen ma dillad war ma chouk  
Ma fuzuill ha ma zabrenn  
Bale bemdeiz deuz kêr da gêr  
Dre ar fank hag ar vouillenn  
Ha goude e fin ma beaj  
Rankoud marteze kampi  
Pe kousked war an douar yen  
Pe marteze bivouaki

Tor o-deus ar re a zoñj se  
Ma halljent lenn em halon  
Evid gweled ma bolontez  
Ha ma inklination  
Ma ne fellje nemed ma gwad  
Me hen skuillfe toud joaüz  
Evid zouten eun impalaer  
Eun tad ken karantezuz

Piou a 'n em gavfe kaloneg  
Gand eun impalaer kristen  
Eur gaoz ken just hag e hini  
A zo aezet da zouten  
Pa om memprou da Jezuz-Krist  
Soudarded an aviel  
Bugale da Zoue an tad  
Templou ar Spered Santel

Arsa eta kamaraded  
Araog mond kuit deuz on hontre  
Deom da iliz Plouillo  
D'on brezervi deuz ar valchañs  
Pa vezim en armeou  
Ha da ziwall e-barz ar gêr  
On tadou hag on mammou

Adieu deoh aotrou Sant Millo  
Patron deuz ar barrouz-mañ  
Adieu kerent ha mignoned  
Paouezit 'ta da ouela  
Pedit Doue hag ar Werhez  
Da gaoud soñj ahanom  
Hag an ael mad d'on hondui  
Dre oll e leh ma afem

Adieu ma mab, ma esperañs  
Eme an tad glaharet  
Piou a zikouro da dud paour  
Goude ma vi partiet  
Pa vin sammet gand ar gozni  
Me vo klevet o lared  
Ma vije bet ma mab er gêr  
En-dije ma frealzet

Kleved ar vamm o kimiadi  
Ivez digand he bugel  
Deus amañ c'hoaz ma pokin dit  
Eur wech c'hoaz araog mervel  
A-benn ma tistroï d'ar gêr  
Me vo eet deuz ar bed-mañ  
Deus amañ etre ma diouvreh  
Evid ar wech diweza

Abaoe ar momed fatal  
Am-eus tennet d'ar billed  
Bemdeiz 'vel ma fell din kousked  
Me a zeblant din gweled  
O tond deuz an emgann gwadeg  
War eun tumporel bleset  
Pe taolet en eun ospital  
Ha gand an oll dilezet

Ar zoudard yaouank glaharet  
D'e dud c'hoaz kent partia  
Evid esêa o hoñsoli  
A lavar en eur ouela  
Tavit ma zad ha ma mamm baour  
Ha bevit en esperañs  
Doue tad ar mizerikord  
A zo braz e brovidañs

Goude ma vo fin d'ar brezel  
Ha gounezet ar viktoar  
Dre hras Doue hag ar Werhez  
E vezo fin d'ho klahar  
Evid merk euz on vaillantiz  
Gand lore ouz on tokou  
Ni a zistroïo prest d'ar gêr  
Evid seha ho taerou

Kenavo da barrouz Plouillo  
Ha d'he oll habitanted  
Kenavo oll anaoudegez  
Ha kerent ha mignoned  
Ha ma n'on-eus ket ar boneur  
Er bed-mañ d'en em weled  
Gras deom er baradoz  
Asamblez d'en em gavoud

## Maro eo ma mestrez

Me am-eus eur 'feunteun  
Barz en kornig ma jardin  
Aze ve'an-me kavet  
Deuz an noz ha d'ar mintin  
Aze ve'an-me kavet  
Atristet gand ar glahar  
O soñjal em mestrez  
A zo eet d'an douar

Deuz poaniou ar bed-mañ  
Fuzuillou ha sabrennou  
Teurvezit ma plij ganeoh  
Finisa din ma deizioù  
Teurveit ma plij ganeoh  
Finisa din ma buhez  
Ma 'h in-me d'ar bed all  
Leh 'ma ma harantez

Me zo ivez bremañ  
Heñvel deuz eur marhadour  
Ha 'neus eur vatimant  
Da naviga war ar mor  
Greet ganti he beaj  
Arriet en porz ar joa  
Ma tostae da Gerne  
E ranko perisa

### Diskan

Maro eo ma mestrez  
Maro eo ma oll fiziñs  
Maro ma 'flijadur  
Ha toud ma oll esperañs  
Biken 'mije soñjet  
Nag ar maro a deufe  
Da lemel diñganin  
Ma dous, ma harantez.

### Taolenn

#### I. Ar hanaouennou e-neus savet Jean Derrien

Ar marh bihan gwenn.....	13
Kastell Toñkedeg.....	17
Pesketaer ar Yeoded.....	21
Son ar pesketaer.....	25
Eur pok kenta.....	29
Son parrouz Louaneg.....	31
Erru eo ar vartoloded.....	37
Ar wezenn avalou.....	41
Ar merhetaer .....	45
War vord ar mor.....	49
Mari-Madalen.....	53
Gavotenn Lanuon .....	57
Ha deuit eta, ma dous.....	61
Laret 'deus din .....	63
Nevez-amzer .....	65
Jean-Mari .....	67
Jañ-Mai bleo hir.....	71
Boñjour bonne femme.....	75
Me 'm-oa choazet.....	79
Ar basajerez.....	81
Ar palourded daonet.....	85
Ar morad braz.....	89

## II. Ar hanaouennou a gane Jean Derrien

Soubenn al lêz.....	95
Son ar martolod.....	99
Mari-Vastrouill.....	103
Gwerz ar miliner.....	105
Son an hañv.....	107
Bleuniou o tremen.....	109
Êzennig flour .....	111
Ar visiklet .....	113
Boñjour ma mestrez.....	117
Ar vilin avel.....	119
Al lezvamm .....	121
Leuskit ho pro.....	123
An hini a garan.....	125
Al lemmer.....	127
Ar martolod tregeriad.....	129
Evom jistr .....	131
Pennherez Penn-ar-Roz.....	133
Son ar jistr .....	135
Silvestrig .....	137
En Tregastell.....	139
Gwerz paotred Plouillo .....	141
Maro eo ma mestrez .....	147

## LEORIOU ALL GAND EMGLEO BREIZ

- Kaz dall, ki tomm, tomato sketchop**, Frank Bodenès, *Roll-Diroll*.  
**Breiz war-raog**, Yann-Berr Thomin, *politikerez*.  
**Breiz a-gleiz**, Herri Gourmelen, *politikerez*.  
**Ar fri war gloued**, Mikael Madeg, *romant*.  
**Koñchennou ar gouelan masklet 2**, Yann Bijer, *koñchennou*.  
**Eur bloavez truillog**, Mikael Madeg, *romant*.  
**Yhed d'an oll ! Hemañ 'zo 'vond da goll !** Yvonne Cadiou, Jean Roparz.  
**Friko Yannig Pennkaled**, Hervé Lossec.  
**Feunteuniou brudet e Bro-Leon**, Mikael Madeg.  
**Anoioù badiziant e Bro-Leon**, P. Pondaven, M. Madeg, Y. Riou.  
**Al levriou e brezoneg evid ar vugale**, Yann-Envel Kervoas, *studi*.  
**Daerou dre ar goueleh**, Jeffrey Shaw, *romant*.  
**Koñchennou ar gouelan masklet**, Yann Bijer, *koñchennou*.  
**Ma beaj Jersey**, Maria Prat, *peziou-c'hoari*.  
**Leor lesanoioù Kerne**, Mikael Madeg.  
**Leor kegin evid ar vugale**, Jeannine Bian.  
**Bremañ... 'zo bremañ ! Neuze 'oa neuze**, Jañ-Mari Skrag, *mojennoù*.  
**Torfed ar chaseaour**, Jean-Claude Miossec, *danevellou*.  
**Loened toud !** Y. Brenig, *danevellou*.  
**Poent 'zo bet e Bro-Leon 5**, M. Madeg, *mojennoù*.  
**Poent 'zo bet e Bro-Leon 6**, M. Madeg, *mojennoù*.  
**Dalh soñj ez out den !** Yann-Vadezour Lagadeg, *danevellou*.  
**Trêz ar Vari-Vorgan**, Yann Bijer, *romant*.  
**Lagad an tan - L'oeil du feu**, P. J. Helias, *barzonegou*.  
**Sioulderioù maouez - Silences de femmes**, J. P. Kermarrec, *barzonegou*.

JOUVE  
11, bd de Sébastopol, 75001 Paris  
Imprimé sur presse rotative numérique  
N° 434142W – Dépôt légal : juin 2007

*Imprimé en France*

Ma zo eur haner a zo bet dalhet soñj deuz e vouez ha deuz e ganaouennou e bro-Dreger eh eo a-dra-zur Jean Derrien. Bet eo bet unan euz brudeta kanerien Strollad Beilladegou Treger. Strakal o daouarn a ree an dud pa glevent anezañ o tistaga e ganaouennou : "pa'h erruen war al leur, emezañ, e cheñche ar zal".

Da genta, e sone hag e kane traou anavezet. Med dond a reas da veza skuiz o kana bepred ar memez kanaouennou. Sed petra 'reas, nemed en em lakad da zevel reou nevez ! Sod e oa Tregeriz gand e ganaouennou, pe e raje goap, pe e raje fent, pe 'vije karantez pe 'vije teneridigez. Plijoud a ree dezañ ive kana ar mor hag ar vartoloded. Ma vije bet eun top 40 e bro-Dreger, sur e vije bet Jean Derrien er penn a-raog.

Eüruz e vez bremañ Jean Derrien pa glev reou yaouank o kana e ganaouennou : laouenidigez a deu diwarne, ha neket melkoni.

[www.emgleobreiz.com](http://www.emgleobreiz.com)

I.S.B.N. : 978-2-911210-69-7

12 euros



9 782911 210693